




# Klañv eo porzh **Sant-Nazer** gant e industriezhioù



Abaoe kant hanter-kant vloaz zo eo liammet a-dost Sant-Nazer ouzh al listri-bale marzhus deuet er-maez eus kalioù Chanterioù an Atlantel. Ur berzh ekonomikel bet tizhet a-drugarez da vilieroù a implijidi lakaet war var da voked soudiñ ha da zanvezioù pistrus all. Da heul ar sevel listri eo erruet industrialourien all, evel an embregerezh temz Yara pe ar burerezh TotalEnergies, a vez o terriñ reoliadurioù ingal, en ur lakaat en arvar bras yec'hed o implijidi. Kadarnaet eo bet gant studioù bet kaset da benn : amañ e varver abretoc'h eget e lec'h all. Met n'eo ket techet ar galloudoù publik da zaoubennañ an embregerezhioù a-bouez bras evit strategiezh ekonomikel ar Stad.



# Klañv eo porzh **Sant-Nazer** gant e industriezhioù

Enklasket embannet e miz Gwengolo 2024

**N**ormandie, France, Queen Mary 2 : abaoe kant hanter-kant vloaz zo eo liammet a-dost planedenn Sant-Nazer ouzh al listri-bale marzhus deuet er-maez eus kalioù Chanterioù an Atlantel. Lorc'h zo e Sant-Nazer gant al listri brasoc'h-brasañ-se. Ur berzh ekonomikel bet tizhet a-drugarez da vilieroù a implijidi, en o zouez e-leizh a vicherourien deuet eus a-bell-vro alies, implijet gant embregerezhioù eil-kevratour evit labourat a-fragadoù, ha lakaet war var da voged soudiñ ha da zanvezioù pistrius all dañjerus evit o yec'hed.

Da heul ar sevel listri eo erruet embregerezhioù industriel e-leizh d'en em staliañ e Sant-Nazer. Seizh outo a gaver er rumm Seveso, abalamour ma vez produet pe sanailhet ganto danvezioù a c'hell bezañ dañjerus evit an dud hag an endro. An embregerezh temz industriel Yara da skouer, hag ar burerezh TotalEnergie a vez o terriñ reoliadurioù ingal, en ur lakaat en arvar bras yec'hed o implijidi. Aon zo gant annezidi ar c'harter evit o yec'hed ivez. Rak kadarnaet eo bet gant studioù bet kaset da benn : amañ e varver abretoc'h eget e lec'h all. Bodet ez eus un dornadig stourmerien e-barzh kevredigezhioù a ra a-walc'h evit dont a-benn da deurel sklerijenn war abegoù ar c'hwitadenn yec'hederez-se. Met n'eo ket techet ar galloudoù publik da zaoubennañ an embregerezhioù a-bouez bras evit strategiezh ekonomikel ar Stad. Ha ma teufe an diskoulm diwar un emglev etre keodedourien, sindikadoù hag enklaskerien ?

**Samy Archimède, Itzel Marie Diaz**

## **Piv eo Splann !**

*Splann !* a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet. A-drugarez da zonezonoù an dud e c'hall *Splann !* Goprañ kazetennerien da labourat war an hir-dermen hag embann enklaskoù war e lec'hienn internet hag e lizher-kelaouiñ.

## LODENN 1

### KOUST DENEL AL LISTRI DUDI

..... page 5

Ur plas a-zoare a zo bet tapet gant Chanterioù an Atlantel e porzh-mor Naoned-Sant-Nazer (44). Met en tu all d'an arouez e kaver implijidi embregerezhioù eil-kevratour lakaet war var da zanvezennoù pistrius.

## LODENN 2

### GOPRIDI EN ARVAR E LABOURADEGOÙ ERRU RE GOZH

..... page 17

Beradurioù, tredan sachet, dale gant ar c'hempenn : nag a reuz e labouradeg temz industriel Yara hag e purerezh TotalEnergies, div lec'hienn dindan sturiad Seveso a gaver e-tal Sant-Nazer.

## LODENN 3

### ETRE SANT-NAZER HA DONEZ EMAN AR STAD O KUZHAT AR SAOTRADUR

..... page 29

Ouzhpenn pemp bloaz warn-ugent zo e vez kadarnaet pegen uhel eo niver an dud tapet gant ar c'hriñ-bev e kêr Sant-Nazer. Daoust da-se e chom kompez darempredoù ar galloudoù publik gant ar saotrierien.

## LODENN 4

### UN HÊREZH DIAES DA LONKAÑ, HINI PUREREZH DONEZ

..... page 39

Degadoù bloavezhioù-pad eo bet purerezh TotalEnergies oc'h itrikañ war ar gumun e-ser goprañ uhel e implijidi ha degas gou-nidoù dreistordinal war an tailhoù. Hiziv emañ an dud o vevañ gant an uzin, e-keit m'eo aet da get kazi an holl spletoù sokial.

# Boest du

Er bloavezhioù tremenet o doa klasket lod eus hor c’heneiled terriñ tav bras ar galloudoù publik a c’holo kevrin yec’hed fall tud Sant-Nazer, en aner. Hon tro e oa da glask kavout ur sklerijenn bennak, evit-se omp aet e darempred gant an annezidi, gant kevredigezhioù tud ar c’harterioù, medisined hag enklaskerien, ha goulennataet ar prefeti ha dilennidi ar vro ivez.

Da geñver hon enklask bet kaset da benn etre miz Here 2023 ha miz Mae 2024 hon eus kaset da benn en tu all da 60 pennad-kaoz evit klask muzuliañ efedoù ar saotradur industriel war yec’hed an dud e Sant-Nazer. Desachet omp bet da gentañ gant an dud a vez an nebeutañ dindan evezh ar mediaoù hag ar muiañ war var d’o yec’hed : gopridi an embregerezhioù-se. Aet omp neuze da furchal dreist-holl e Chanterioù an Atlantel, kentañ implijer industriel, al labouradeg Yara hag ar burerezh TotalEnergies, an div lec’hienn rumm Seveso a vez evezhiet ar muiañ e Sant-Nazer.

Dre deir gwech hon eus bet kaset posteloù da servij kehentiñ ar Chanterioù, hep kaout tamm respont diganto. N’eo bet roet digor deomp war o « zachenn kelaouiñ », un dachenn a zo digor d’an holl gazetennerien, sañset. An den e-karg eus ar c’hehentiñ e purerezh Donez, diouzh e du, zo bet dereat a-walc’h da lâret deomp ne rofe respont ebet d’hor goulenn pennad-kaoz. Renerezh Yara Frañs hepken he deus asantet respont deomp dre bostel d’an heuliad goulennoù kentañ bet kaset dezho, met ket d’an eil.

Dre ma ne oa ket bet roet deomp kalz a ditouroù digant an embregerezhioù-se hon eus ranket diazezañ hol labour da gentañ war an testenioù ha dielloù bet pourchaset deomp gant sindikalourien hag implijidi, lod outo eil-kevratourien ha labourerien a-frapadoù. Gwelloc’h eo bet kavet gant lod outo chom dizanv evit reiñ o zesteni deomp, kuit dezho da bakañ rebechoù pe kastizoù digant o implijerien. Diouzh o zu, hini ebet eus medisined al labour – war al labour pe war o leve –, n’en deus fellet komz eus o buhez labour war ziazad Sant-Nazer.

*« Pezh a eo en embregerezh a chom en embregerezh. N’hon eus ket ar gwir reiñ keloù da c’houzout », a zispleg e berr gomzoù ur chafoder a ro deomp e desteni eus an doareoù labour spontus hag eus ar saotradur a vez e labouradeg Yara.*

# KOUST DENEL AL LISTRI DUDI

Mordreizherioù-bale bras-divent ha lorc'hus ha listri-brezel : ur plas a-zoare a zo bet tapet gant Chanterioù an Atlantel, fleurenn industriezh ar Frañs, e porzh-mor Naoned-Sant-Nazer (44). Met en tu all d'an arouez, e-kreiz moked ar souderien ha flaes an tireoul o tiverañ, e kaver na pet implijad embregerezhioù eil-kevratour lakaet war var da zanvezenoù pistrius.



】 An darn vrasañ eus ar vicherourien eus estren vroioù ne chomont ket ouzhpenn c'hwec'h miz e Sant-Nazer hep gouzout penaos e vo o yec'hed abalamour d'an danvezioù pistrius bet alonet.

】 « Pal an implijerien a zo bet eil-kevratiñ hag is-eilkevratiñ ar muiañ ma c'hellent, kement hag eil-kevratiñ ivez ar riskloù ha terriñ lañs ar sindikadoù en ur lakaat kevezerezh etre ar vicherourien », eme André Fadda, bet souder eil-kevratour ha dileuriad CGT war lec'hienn ar Chanterioù.

】 Bamet eo ar skiantourez Juliette Heinrich eus an niver izel-kenañ eus medisined al labour a zo ha pegent fall int stummet ar vedisined kêr d'ar c'hudennoù yec'hed liammet gant al labour.

**P**ezh a welit ouzh an tu kleiz aze, eo hini kentañ eus rummad al listri-bale meur bet savet amañ : 240 metrad a hirder ha 29 a ledander. Listri lorc'hus-bras ! », a gont an heñcherez touristelezh. Un digarez evit Chanterioù an Atlantel da lakaat warwel bravigoù kaerañ he stal : al lestr Utopia of the seas, ur mordreizher evit an holl, a c'hell degemer betek 7.000 den war an dro ; ar Silenseas hag e lie-noù e gwienn garbon, arouez nevez stur ekologel an embregerezh, sañset ; hag ar Jacques-Stoskopf, lestr-brezel pourvezer bet gourc'hemennet gant ar morlu broadel.

Rouantelezh ar ramzed eo ar « Chanterioù » : ouzhpenn 200 devezh arat (100ha) a ra an dachenn a saver enni bigi bepred brasoc'h e poulloù-sec'h hag e karrdioù-bigi divent. Gant an embregerezh e vez implijet en tu all da 3.500 den « en ti », met ivez etre 5.000 ha 7.000 goprad eil-kevratour eus « en tu all da 600 embregerezh », hervez ar CGT. En o zouez kalz micherourien lakaet bemdez war var da voged ar soudadurioù ha da veur a zanvezenn gimiek<sup>1</sup>, pell-mat o buhez pemdeziek diouzh hini treizhidi al listri emaint o sevel.

« Un deiz, goude al labour, e oan tapet fall :



Setu mont e-barzh Porzh Bras Naoned-Sant-Nazer, e Moustier-al-Loc'h.

1] Enjeux de santé au travail et cancers : Les expositions à supprimer dans les métiers portuaires. Une recherche-action sur le Grand Port Maritime de Nantes / Saint-Nazaire, Patrick Chaumette, Véronique Daubas-Letourneux, Augustin Emame, Franck Héas, Christophe Coutanceau, 2014

poan alaniñ, c’hweziñ a raen forzh pege-  
ment, paket e oan dizehan gant ar red-  
korf. Kaout a rae din e oa disoc’h din. »  
Loig<sup>2</sup> zo labourer a-fragadoù nevez  
zo, ha tad a familh. Diouzh e glevet e  
vefe bet lakaet gant an embregerezh  
eil-kevratur da soudiñ inoks hep na  
vefe gantañ aeadur hiniennel gware-  
ziñ azasaet, hep aotre na stummadur,  
hag hep na vefe bet heuliet gant ur  
medisin. Pevar devezh goude bezañ  
en em gavet klañv e voe diskoachet,  
a-drugarez d’ur savadenn-droazh, e  
oa bet kontammet Loig gant krom VI.

## UR C’HLEZE DREIST D’E BENN

« *E-pad meur a viz eo bet [Loig] war var  
da voged ar soudiñ inoks, ha pistriet eo  
bet gant krom VI, evel m’eo bet lakaet  
war-wel* », setu pezh zo kadarnaet gant  
e bneumologourez. Goude un ehan-la-  
bour hir en deus gelllet adkavout ul la-  
bour, met goude bezañ bet pistriet eo  
bet kollet gantañ 38 % eus e varregezh  
analiñ. « *N’hellan ket soudiñ ken, n’hellan  
ket ken c’hoari gant ma bugale evel a-raok,  
emezañ gant tristidigezh. Pa ’n em lakan da  
redek, pe pa glaskan krapat gant an diri e  
vezan dianalet diouzhtu.* » Fuloret hag an-  
keniet eo Loig. Evit ma vefe rentet justis  
dezhañ e rank ar souder kas e implijer  
d’al lez-varn war-zigarezh « fazi poun-  
ner ». Gant ar c’hrom 6 bet karget en

« **N’hellan  
ket ken  
c’hoari gant  
ma bugale  
evel  
a-raok.** »

e gorf eo kendrec’het ez eus ur c’hleze  
dreist d’e benn hiviziken.

Er Chanterioù e reer eus moked ar  
soudañ evel gant kozh-kaozioù Mari-  
rahouenn<sup>3</sup>. Enebour spontus an holl vi-  
cherourien eo koulskoude, abalamour  
d’an holl gompozadoù metalek a gaver  
enno (nikel, aluminiom, krom VI, kouevr,  
plom, manganeez...). Gant Kreizenn etre-  
vroadel an enklaskoù war ar c’hrign-  
bev ez in lakaet int e renk danvezioù  
« kankreiat » evit an dud<sup>4</sup> adalek 2018.

Pennkaoz meur a batologiezh bron-  
kez-skevent e c’hellont bezañ, e-touez  
kleñvedoù all.  
E-touez an doareoù soudañ a vez implijet  
er Chanterioù ez eo ar soudiñ « inoks »  
a vez an hini nozusañ. Disteurel a ra

2] An dud anvet gant un anv-bihan hepken zo bet dianavelaet.

3] « Fumées de soudage, un risque majeur », lec’hienn web Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour hag ar c’hleñvedoù micherel, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

4] « Cancérogénicité du soudage, du trioxyde de molybdène et de l’oxyde d’indium-étain », levr 118, *Monographies du CIRC*, 2017



*Ur micherour eus estren-vro a ya d'e ranndi e kreiz-kêr.*

krom VI (pe krom c'hwec'h-talvoud<sup>5</sup>), ar metal eo bet pistriet Loig gantañ, ha lakaet e renk kankreat evit an dud abaoe en tu all da dregont vloaz. Met daoust m'eo dañjerus e vez implijet forzhig er Chanterioù, dreist-holl pa vezer gant pennadoù diwezhañ ar sevel listri, (pa vezer o sevel ar c'heginoù da skouer), eme ar CGT, ar sindikad muianiver e-touez micherourien ar Chanterioù. Darn vras an implijidi a ra ar soudadurioù inoks-se a vez o labourat evit embregerezhioù eil-kevratour (« ken-sevenourezed », evel ma kav gwelloc'h d'ar renerezh lâret). Sañset e vezont lakaet

da blegañ ouzh ur protokol yec'hed strizh-kenañ<sup>6</sup> : aer sunet war-eeun, kougoul peurgloz gant ur gwenterezh amei-let<sup>7</sup>, prouadoù troazh bep Merc'her evit kontrollañ al live krom VI<sup>8</sup>, ha kement zo. Nemet hag aotre e vefe, ez eo difennet an teknik soudiñ-se d'an dud a labour a-frapadoù<sup>9</sup>, an etreadegourien<sup>10</sup>, « war abegoù heuliañ mezegel. Un tamm mat aesoc'h eo heuliañ un implijad zo gant ar Chanterioù, pa ne vez ket frammet kement al labourerien etreadegour », a zispleg ar CGT.

Padal, evel ma tiskouez deomp afer Loig, ne vez ket doujet bepred ouzh ar

5] « Chromium, Nickel and Welding », *Evaluation of Carcinogenic Risks to Humans*, levr 49, IARC monographies, 1990

6] « Recours au TT et Travaux Interdits », lec'hienn web Atrihom embannet e miz Meurzh 2020, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

7] « Consignes de sécurité, travaux soudage sur inox/duplex », skritellañ Chanterioù ar Meurvor Atlantel, 2020

8] « Consignes de sécurité, travaux soudage sur inox/duplex », skritellañ Chanterioù ar Meurvor Atlantel, 2020

9] « Fiche d'exposition lors du soudage matériaux durs (inox , duplex) », Chanterioù ar Meurvor Atlantel, 2016

10] Article D4154-1, Code du travail, site web Legifrance, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025



reolennadurioù : sklaer eo an torr-lezennoù graet gant an implijer, evel m'eo meneget e danevell medisin al labour. « *Implijidi e-leizh a vez kontammet war vourzh ar bigi, hep gouzout dezho peurliesañ* », eme Loig diouzh e du. Ha miche-rourien a-ziavaez-bro, ar re « zistag », deuet eus broioù ar Reter alies (Polonia, Bulgaria, Moldavia, Ukraina, ha kement zo) niverus-tre war bontoù al listri, eo ar re a vez ar muiañ en arvar.

Pet anezho evel-se ? Hervez sokiologourien zo e vefe tro 20.000<sup>11</sup> niver ar c'hopriddi a-ziavaez-bro diskleriet etre ar c'hentañ a viz Genver 2016 hag ar c'hentañ a viz Even 2019 e diazad Sant Nazer (da lâret eo Chanterioù an Atlantel, Airbus ha purerezh TotalEnergies). A-drugarez d'un enklask all bet savet e 2018 gant ajañs kêraozañ korn-bro Sant Nazer<sup>12</sup> e ouzomp ne chom ket en tu all da c'hwech miz an div drederenn anezho. Peurliesañ ez eont kuit en-dro d'o bro orin, en ur gas ganto sekred stad o yec'hed, ha penaos int bet en arvar. « *Lod outo n'o deus ket aon lakaat o buhez en arvar evit tapout goprou a ya betek dek gwech pezh a c'hellfent gounit er gêr* », a zispleg Sébastien Benoît, dileuriad CGT.

## EIL-KEVRATIÑ AR RISKLOÙ

### A-DRUGAREZ D'UR

#### « PRIENTADUR A-ZIAVAEZ-BRO »

Pa vez ur gwallzarvoud bennak, pe ma

ne vez ket doujet ouzh ar reoliadurioù a-berzh unan eus e eil-kevraturien, e vez kinniget dezho gant ar Chanterioù « Diell reolennoù pennañ HSE »<sup>13</sup>. Ur pezh levr a 529 pajenn, ennañ munudoù ar mont en-dro ret evit pezh a sell ar yec'hedourez, surentez hag endro, bet savet evit gwareziñ yec'hed ar vicherourien. « *Gant an teul-se e c'heller lakaat ar giriegezh war gein o eil-kevraturien, setu soñj un dileuriad all eus ar CGT a gav gwelloc'h chom dizanv. Ar vicherourien diavaez-bro a c'hell soudiñ inoks forzh pegement, ne vint ket evezhiet gant ar Chanterioù.* » An eil-kevraturiezh hag is-eil-kevraturiezh a vez stank er chanterioù, betek ma koller roudoù ar vicherourien ha ma teuzer ar c'hiriegezhioù, eme c'hoazh an dileuriad sindikad. Ur prestatour eus Frañs a c'hello da skouer eil-kevratiñ d'un embregerezh italian, a lakaio d'he zro da eil-kevratiñ implijidi eus Roumania a labour evit embregerezhioù all.

Diouzh tu ar CFDT, sindikad bihanniver e-touez ar vicherourien, e kaver gwelloc'h treiñ ar billig war an tu mat. Hervez e zileuriad, Jérôme Dholland, eo « *aet an traoù war-raok da vat* » abaoe m'eo erru en embregerezh 24 bloaz zo, evit pezh a sell gwarez an implijidi war var da voged ar soudiñ. « *Hiriv an deiz emañ an eil-kevraturien o lakaat ar reolennoù e pleustr kalz gwelloc'h* », emezañ en ur

11] « Le détachement comme planche de salut ? Le recours à la main-d'œuvre étrangère dans la construction navale. », Sara Casella Colombeau, Claire Flécher, Jean-Marie Pillon, Daniel Veron, Claire Vivés, *Migration et travail détaché en Europe*, 2022

12] « Enquête : modes de vie des travailleurs détachés dans la région de Saint-Nazaire », Yannick Hascoët, Jessie Dubief, Ajañs kêraozañ rannvro Sant-Nazer 2018

13] « Recueil des principales règles HSE », Chanterioù ar Meurvor Atlantel, 2023



*Micherourien dirak ar chanterioù o c'hortoz ar c'harr-boutin a zegaso anezho er ger.*

venegiñ « *kartennoù melen* » da skouer, a oa bet staliet un nebeut bloavezhioù zo evit kastizañ ar re ha « *ne labouront ket gant doareoù ar surentez* ». « *Ne gredan ket e vefe ar Chanterioù o lakaat buhez e vicherourien en arvar a-ratozh-kaer* » a ouzhpenn dileuriad ar sindikad. Prest eo da anzav koulskoude : « *Anat eo e ranner kavout doareoù nevez da gas ar c'heloù pelloc'h. Gant skouer an amiant eo bet lakaet sklaer e c'helle traoù zo bezañ ur riskl bras waran hir dermen.* »

Laouen-bras e vefemp bet gouzout pere e oa an diarbennoù bet tapet gant ar Chanterioù evit gwareziñ ar milieroù a implijidi distag a vez o labourat war al lec'h, ha penaos e vez graet war-dro an heuliañ mezegel. Padal n'eus bet digaset tamm respont ebet d'hor goulennoù gant servij kehentiñ an embregerezh. Ha n'eo ket dre zegouezh ma vefe

kement a vicherourien degaset eus an estrenvro da Chanterioù an Atlantel. Un dibab bet tapet e penn-kentañ ar bloavezhioù 2000 eo kentoc'h. E miz Here 2001 e oa bet kaset d'an embregerezhioù eil-kevratur un notenn gwall ziambac'h anvet « *stignad egzotek* »<sup>14</sup>, gant ar pal degas da Sant-Nazer labourerien « *sentus* » ha « *marc'had-mat* », o tont eus « *Maroko, Ukraina, Portugal hag an Emirelezhioù-Arab-Unanet* », evel ma c'heller lenn en teul.

Ha tri bloaz warn-ugent war-lerc'h eo ar vicherourien-se, eil-kevraturien hag etreadegourien, labourerien a-frapadoù, e kalon mekanik bras ar Chanterioù. « *Er bloavezhioù 90 e oa galloudus-tre sindikad CGT an etreadegourien, efedus-tre evit difenn yec'hed ha surentez al labour. Pal an implijerien a zo bet neuze eil-kevratiñ hag is-eilkevratiñ*

<sup>14</sup> Lizher añvet « *Montage exotique* », Chanterioù ar Meurvor Atlantel, 2001

ar muiañ ma c'hellent, kement hag eil-kevratin ivez ar riskloù, e berr gomzoù en em zizober eus o c'hiriegezhioù. Met ouzhpenn-se terriñ lañs ar sindikadoù en ur lakaat kevezerezh etre ar vicherourien. Ha ken kreñv m'int bet gwasket, gant kontradoù berrbad ur sizhunvezh, m'eo bet asantet gant paotred zo labourat gant doareoù dañjerus-meurbet », evel ma tispleg André Fadda, bet souder eil-kevraour ha dileuriad CGT war lec'hienn ar Chanterioù. Ouzhpenniñ a ra : « Raktal p'eo digresket niver ar stourmerien war an dachenn eo aet buan war fallaat an doareoù labour... »

## **INGAL A-WALC'H E VEZ TORRET AR REOLENNADUR**

Piv 'ta zo war var da lonkañ moked pistrius ar soudiñ ? Micherourien eil-kevraourien nemetken, pe gopridi an « ti » ivez ? Diwar an 3.000 da 4.000 micherour a veze implijet gant ar Chanterioù

war-eeun 25 bloaz zo, a-boan ma chom ur mil bennak outo. Lod outo a vez o labourat en atalieroù panelloù plaen. Tamm krom VI ebet amañ, met moked e-leizh.

« Aveet-mat omp amañ, eme Elliott, ur souder yaouank. Gwiskañ a reomp kougoulioù gwentet, ha kavout a reer reizhadoù sunañ ar moked war pep post labour. » Met klask ur gwarez direbech bepred zo 'vel klask pemp troad d'ar maout, emezañ : « gant ar renerezh ez omp broudet bremañ da implijout tumennoù sunañ moked a zo binviji pounner-mat ha diaes a-walc'h da embregañ. Krog omp da vont da fall ha da c'houzañv diwar stirenadoù ». N'eo ket gwall aes en em wareziñ diouzh gaz ha poultrenn pistrius ivez. « Dont a ra ar c'hudennoù dreist-holl pa vezomp o vont d'ul lec'h d'egile, pa dennomp hor c'hougoulioù.... Ret e vefe deomp gwiskañ bepred maskloù "fri-minoc'h" (FFP2). Met diaes eo pa vez tomm ha pa vez ganit da lunedoù-gwareziñ rak

*Setu ar vag dudi  
Symphony of the Seas.*





*Alies a-walc'h e labour micherourien Chanterioù an Atlantel gant produioù dañjerus evit o yec'hed.*

*dont a reont lizennek. »*

Etre 2021 ha 2022 ez eo un tregont gwech bennak eo bet torret ar reolenadur a-fed gwareziñ diouzh maged ar soudiñ, hervez pezh zo bet enrollet gant izili ar Bodad yec'hed, surentez ha kondisionoù labour (CSSCT) goude ma vefe bet ensellet al listri. Met n'eo ket stadet penn-da-benn abalamour n'eus nemet un eurvezh bep pemzektez evit dilennidi ar c'hoskor da gontrollañ ul lestr en e bezh. Un dra zo sur evit Sebastien Benoit, dileuriad ar CGT ha micherour war vourzh ul lestr : « *Ingal e vez torret ar reolennoù mont en-dro. Bemdez e welan an embregerezhioù eil-kevratour a laosk o micherourien soudiñ hep na vefe ganto maskloù dereat evit-se.* »

## **E STRAD AL LESTR EMAÑ GALEOUREZED AR C'HEMPENN**

E-keit m'emañ ar souderien o labourat

e-kreiz bouilhoù maged e vez maouezed ha gwazed, implijet gant un embregerezh kempenn eil-kevratour, oc'h alaniñ war ar bemdez aezhennoù hag eufl pistrius diwar trelosk ha dileizherioù<sup>15</sup>. En o c'hefridi : reiñ d'ar paramantourien listri kempenn ha direbech e koulz hag e kentel.

E strad al listri, e sal ar mekanikoù, dindan ar balastroù, aze eo e vez an dañjerusañ hag ar spontusañ doareoù labour. Tomm-gor a-hed an deiz, pa ranker en em stlejañ etre tuellennoù tomm-ruz evit tennañ kuit diverradennoù eoul, gazeoul pe fioul gludek bet dileizhet gant danvezioù di-derek.

Labour pemdeziek Kristell eo bet e-pad bloavezhioù. « *Ur wech e oa bet fioul gludek o tiverañ e-pad eizhtez : a-hed ar sizhun omp chomet e-barzh ar fioul... Pa'z aemp er-maez e chome stag ouzh hon dilhad pe war hor c'hroc'hen, met ne oa tamm strinkadenn evidomp, dav e oa distreiñ d'ar*

15] Restroù roadennoù surentez

*gêr evel ma oamp !* », emezi, mantret c'hoazh. Ha pevar bloaz zo eo bet diskoachet e oa taget gant krign-bev ar c'hwezbigell<sup>16</sup>. Ha daoust ma oa harpet gant ar medisin e oa bet nac'het outi bezañ anavezet evel kleñved micherel<sup>17</sup>. Rak evit poent n'emañ ket he c'hrign-bev war daolenn kleñvedoù micherel stag ouzh he labour<sup>18</sup>.

Hag alies-mat emañ kont evel-se siwazh, abalamour ma vez savet an taolennoù-se « *war griterioù digalonekaus ha n'int ket abeget sklaer* », eme Philippe Deguiral, medisin onkologour, keuz en e vouezh. E-pad 26 vloaz eo bet medisin e Sant-Nazer : « *evit ma vefe anavezet ur c'hleñved da vezañ bet stignet dre ar vicher e ranker mont e-barzh kombodoù strizh, ha prouiñ e vezer bet war var danvezioù zo e-doug ur mare resis, ha bezañ e-diabarzh ar prantad resis evit bezañ kemeret e karg* », emezañ evit mont dre ar munudoù. Anavezet eo bet Kristell evel « labourerez nammet » gant ar surentez sokial memestra. Ha gant medisin al labour eo bet nac'het dezhi adkemer ur post diaes evit e c'horf. Gellet a raio tapout ur post labour, met « *hep na dostafe gwech ebet diouzh danvezioù kimiek* ».

Evit he c'henlabourerien ez eo direizh krenn ar fed ne vefe ket anavezet he

# « Produioù zo hon eus bet implijet e-pad pell a-raok ma vefent berzet. »

c'hleñved evel unan deuet diwar ar vicher. « *Anat eo din e teu he c'hrign-bev c'hwezbigell diwar an hidrokabidennoù, ar fioul pe an danvezioù kimiek all a vez implijet war ar chanter*<sup>19</sup> », eme Mari. Ma ne labour ket-hi e-touez ar mekanikoù evel Kristell, he deus bet he lod a zanvezioù kimiek ivez koulskoude. « *E-doug ur pemzek vloaz bennak hon eus bet frotet panneloù inoks al listri gant un dizruzer kimiek kreñv, ha noazh hon daouarn ! Ne oa nemet evel-se ma teuemp a-benn. Un devezh koulskoude eo bet lâret deomp gant mestr ar chanter ne oa ket aotreet implijout an dizruzer-se ken, abalamour ma*

16] « Cancer de la vessie en milieu professionnel », plaketenn embannet gant Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour ha kleñvedoù micherel, 2009

17] Lizher kemenn enep kaset gant an Asurañs kleñved, 2021

18] « Cancers professionnels », teuliad gant Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour ha kleñvedoù micherel, 2023

19] « Agents chimiques CMR », teuliad gant Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour ha kleñvedoù micherel, 2024



Setu Chanterioù an Atlantel e Sant-Nazer. Ouzhpenn 10.000 den a labour eno bep bloaz, 5 da 7.000 is-kevratourien anezho.

oa CMR (kankreiat -a gas ar c'hri- bev -, mutagenek pe pistrius evit ar gouennañ). Produioù zo evel-se hon eus bet implijet e-pad bloavezhioù a-raok ma vefent berzet. Ret eo cheñch penn d'ar vazh, evit hon bugale memestra. Re ziwezhat evidomp, lipet omp ! », emezi gant keuz.

Ma anzav Mari e vezont gwarezet gwelloc'h bremañ eget na oant er penn-kentañ er bloavezhioù 1990-2000, e tislep deomp n'eo ket posupl chom gant ur maskl war o fenn a-hed an devezh pa vezer o labourat, abalamour d'an tommer hag al lizenn. Ouzhpenn da-se e labouront en aozioù-labour eur ar gwashañ, ha n'int ket stummet na kelaouet mat gant o implijer diwar-benn ar produioù a vez implijet ganto, hag o dilerc'hioù war o yec'hed. Souezhet eo Mari ha Kristell n'o defe ket bet a heuliañ yec'hed a-ratozh ivez : « Gwech ebet n'hon eus bet na savadenn-droazh na bilañs gwad !, a estlamm Mari. Daou vloaz zo d'an nebeutañ n'em eus ket gwelet medisinerzh al labour. »

Rak war a seblant ne vez ket ensellet

ar Chanterioù ken. Ul lodenn vat eus ar vicherourien war var eus danvezioù pistrius a dremen e-biou da ensellerezh ha medisinerzh al labour. Ha n'he deus ket fellet d'an DREETS Broioù-al-Liger respont ouzh goulenoù Splann ! diwar-benn ar Chanterioù na diwar-benn an embregerezhioù lec'hel all. Hervez an eilrener, Philippe Caillon, n'heller ket muzuliañ « an niver gwechoù m'eo torret ar reoliadurioù e Sant Nazer, na gouzout o abegoù resis ». Resisaat a ra koulskoude « ez eus bet embannet divizoù paouez gant obererezhioù zo da heul ma vefe bet lakaet micherourien zo war var da zanvezioù krom VI enno ». Hag ouzhpenn-se : « ingal e vez servijoù ensellerezh al labour oc'h emelliñ war gudenn an dud war var d'ar produioù saotrus elfennoù krom enno, (krom VI, maged soudiñ, ha kement zo) war dachenn ar vetalouriezh, ar sevel listri, an aerlistri hag ar sevel-tiez (stadañ a reomp ne vez ket sunet anien ar maged, na/pe lakaet e kerzh ar vicherourien aveadurioù gwareziñ). » Evit pezh a sell ouzh

ar pevar medisin al labour eus Sant Nazer hon eus goulennet emgav ganto, hini ebet n'en deus roet an disterañ respont deomp.

« *Nebeut a roadennoù a gaver war an heuliañ gopridi. Ha diaesoc'h c'hoazh e vez sevel roadennoù dre ma vez kaoz eus eil-kevratourien, rak tud zo a vez o labourat evit meur a stroll embregerezh, ha bezañ tapet meur a wech gant danvezioù pistrius.* » Juliette Heinrich, medisinezh hag he deus soutenet he zezenn e miz Du tremenet diwar-benn « *faktorioù riskloù krign-bev* »<sup>20</sup> war gumun Sant Nazer, a ro he zesteni. E-doug hec'h enklaskoù eo bet skoet gant an diouer mantrus a vedisined al labour, an diouer

a stummadurioù diwar-benn kudennoù yec'hed war ar chanteroù da vedisined kêr, dreist-holl pa weler pegen niverus an embregerezhioù a gaver e diazad Sant-Nazer [*Sellit ouzh ar gartenn etre-oberiant*].

« *N'eus ket kalz a krignoù-bev hag a vez anavezet evel kleñvedoù micherel, estreget evit an dud bet lakaet war var d'an amiant, alese e vez tennet o gwirioù digant an dud.* » Na pet hini, evel Loig, bet goulennataet ganeomp, ha bet pistriet gant krom 6, a ranko en em gannañ evit ma c'hellfent prouiñ al liamm etre o labour hag o c'hleñved ?

**Samy Archimède**

20] « État des lieux des facteurs de risque de cancers dans la Carène », Juliette Heinrich, tezenn, kevrenn vedisinerzh Naoned, miz Du 2023

## **Airbus Atlantic : takadoù dispis un trec'h ekonomikel**

65 miliard a euroioù a gengreadur ha 735 karr-nij kenwerzh bet gwerzhet : ur bloavezh kaer eo bet 2023 evit ar strollad Airbus. Un dro-vat ekonomikel a zle kalzig d'an is-embregerezh Airbus Atlantic, gant e lec'hioù produiñ en Naoned, Mouter-al-Loc'h ha Sant-Nazer. Met un dro-vat ekonomikel a dalvez ivez eo bet kresket ar c'hadañsoù abaoe daou vloaz evit ar 6.000 implijad war an teir lec'hienn (labourerien a-fragadoù hag eil-kevratourien ouzhpenn).

« *Ur gudenn vras eo ar riskloù psiko-sokiologel (RPS), diouzh an druilh e teont deomp ! Rak ret eo d'an embregerezhioù kas o listri e koulz hag e kentel, hag e stad vat !* », eme Karl Mahé, penn-sekretour CGT e Airbus Sant-Nazer, chalet un tamm. Dont a ra ar RPS ouzhpenn ur gudenn vras koshoc'h : an arvar d'an danvezioù pistrius. Ne veneger nemet ur wech krign-bev ar skevent evel kleñved micherel e-doug ar bloavezhioù 2021 ha 2022 e danevell 2022<sup>1</sup> medisin-labour Airbus Atlantic

1] « Rapport annuel, service de prévention et de santé au travail », Airbus Atlantic Saint-Nazaire, 2022



Sant-Nazer hon eus gelllet kaout da lenn. Met en teul-se ne veneger nemet implijidi Airbus ha neuze ne daol ket pled ouzh al labourerien a-fragadoù nag eil-kevratourien, en arvar bras koulskoude, dreist-holl dirak an dioksid manganéz, un danvez pistrius pa vez analet, hag a zeu er-maez pa vez lakaet mastik<sup>2</sup>. Diwar an niver a 899 implijad e c’heller kontañ 122 outo en danevell-se hag a vefe bet war var an danvezioù « CMR » (kankreiat, mutagenek pe pistrius evit ar gouennañ), 509 an niver outo bet war var dileizherioù organek ha 107 outo war var d’an drenkenn gromek pe d’ar c’hromat pe daougromat alkaliek. « *Emeur o studiañ diskoulmoù da gaout evit digreskiñ an arvar d’ar produioù kimiek, ha d’ar c’hrom dreist-holl* », setu pezh zo kadarnaet gant medisin al labour en e zanevell.

Diouzh e du emañ Karl Mahé o rebech d’ar renerezh teurel muioc’h a bled ouzh riskl stirennad un implijad war e labour eget ouzh ar riskl ma vefe tapet un implijad gant ar c’hriñ-bev ur wech erru war e leve, zoken ma anzav e krog da deurel ur sell pishoc’h war kudenn an arvaroù reoliek. Diouzh e du, un dilennad all a glask kompren perak n’emañ ket ken medisinez al labour o kemer perzh en emvodou ar Bodad sokial hag ekonomikel abaoe daou vloaz, pa rae gwechall. « *Meus aon emañ dindan wask evit ma ne zeufe ket* », a anzav. Pe ne vefe ket a amzer ganti ken, abalamour d’an diouer kriz a vedisined a labour a vez hiriv an deiz ?

**Samy Archimède, Itzel Marie Diaz**

2] « Dioxyde de manganèse », fichenn drougoniel niv. 52, lec’hienn web Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour hag ar c’hleñvedoù micherel, pajenn lennet e miz Genver 2025



# GOPRIDI EN ARVAR E LABOURADEGOÙ ERRU RE GOZH

Beradurioù, tredan sachet, dale gant ar c'hempenn : nag a reuz e labouradeg temz industriel Yara hag e purerezh TotalEnergies, div lec'hienn dindan sturiad Seveso a gaver e-tal Sant-Nazer. Un endro gwall arvarus evit kantadoù a vicherourien a c'hell bezañ lakaet war var d'an amoniak, d'an nitrat amoniom, d'ar benzen ha d'an hidrokarbidennoù aromatek lies-kelc'hiek.



Samy archimède

- 】 Sañset e rankfe an embregerezh Yara paeañ e-tre 35 ha 45 milion a euroioù evit doujañ ouzh al lezenn met e plas ober al labourioù e vez tapet taolioù-kastiz ganti eus perzh ar Stad.
- 】 58 % eus korzennoù purerezh TotalEnergies e Donez ne zouje ket ouzh ar reoladoù e 2022.
- 】 Emañ TotalEnergies o sevel un unvez disulfurmiñ a-drugarez d'ur 400 micherour eil-kevratour bennak. Hervez sindikad ar CFDT « ez eus bet kalz a wallzarvoudoù grevus ».

**M**arvet ez eus un den war e lec'h labour d'ar Meurzh 24 a viz Here 2023 goude merenn, war lec'hienn ar saver temz industriel Yara<sup>1</sup>, e Mouster-al-Loc'h (44), nepell eus Sant-Nazer. Divuhez eo bet kavet gant e geneiled, el « lec'h buhez », un dachenn miret evit implijidi an embregerezhioù eil-kevra-tour. M. Zeidouni, hanter-kant vloaz, a oa o labourat a-frapadoù evel chafo-dour evit Siemo, purchaser Yara. Tapet fall e vefe bet e-doug ar mintinvezh labour, en em lakaet da zislonkañ. Ha liammet e vefe e varv gant an doareoù ma oa lakaet da labourat ? Hag analet en defe aezhennoù pistrius ?

E 2022, E Ambès (er Jirond), war ul lec'hienn produiñ all er Frañs eus an embregerezh Yara, e oa bet pistriet pevarzk implijad, gwall-glañv daou anezho, goude bezañ analet aezhennoù amoniak da heul ur bera-dur. Ha gant an hevelep gaz e vefe bet tapet fall M. Zeidouni p'eo marvet war lec'hienn Moustouer-al-Loc'h ? « *Tamm ebet* », a respont da *Splann !* bez prokulo-lorez lez-varn justis Sant-Nazer d'ar 26 a viz Genver diwezhañ. « *Gant pezh*

*a ouzomp e vezer lakaet da soñjal eo degouezhet e varv gant un abeg naturel, dre ma oa erru fall yec'hed ar reuziad un tamm mat en a-raok, pezh zo bet diskoachet gant ar skej-korf, ha netra na c'hell lakaat da soñjal e vefe bet e-liamm gant ar fed analiñ danvezioù kimiek. »*

Douetus e chom Thierry Noguét, maer Mouster-al-Loc'h, gant seurt klozadurioù. En em gannañ a ra abaoe pevar bloaz ouzh al labouradeg erru kozh-mat, ha deuet da vezañ un dañjer evit an implijidi koulz hag evit annezidi ar c'harter. An embregerezh Yara zo hini kentañ ar bed evit ar werzh temz-ludu

sintetek, implijout a ra kementadoù bras e broduioù dañjerus, pistrius zoken : amoniak<sup>2</sup>, azot, fosfor, kaliom, trenkenn sulfurek. Met ivez nitrat amoniom<sup>3</sup>,

a oa bet pennkaoz tarzhadennoù labouradeg AZF e Tolosa (2001) hag hini porzh Bayrut (2020). Ur « process »<sup>4</sup> a ro lec'h da riskloù evit an implijidi, pa vez diskarget uloc'h amonitrat. Hervez Aozadur etrevroadel al labour<sup>5</sup>, an uloc'h-se a c'hell bezañ pennkaoz da danijenn spontus an daoulagad, ar c'hroc'hen ha d'ar reizhiad analiñ, ha

## **Gall a ra bezañ dañjerus evit ar yec'hed ar poultrennoù.**

1] Fichenn titouroù Savadur Seveso live uhel, Yara Frañs – uzin Mouster

2] « Ammoniac et solutions aqueuses », fichenn toksikologiezh n° 16, lec'hienn internet Ensavadur broadel an enklaskerezh hag ar surentez evit dizarbenn ar gwallzarvoudoù labour hag ar c'hleñvedoù micherel, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

3] « Nitrate d'ammonium », lec'hienn web Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour hag ar c'hleñvedoù micherel, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

4] « Visite de l'usine Yara à Montoir », video embannet war Youtube d'an 11 a viz Gouere 2013, ajañs Her-Bak mediaoù, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

5] « Nitrate d'ammonium », fichenn deskrivañ embannet e 2013 lec'hienn web Aozadur etrevroadel al labour, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

A protest sign made of wood and white paint. The text is written in black and green. The top line says 'YARA FUÏT', the second line 'L'ÉTAT FUÏT', and the bottom line 'NOUS RESTONS' in green. There is a vertical red stain on the right side of the sign. In the background, a person in a yellow safety vest is visible.

YARA FUÏT  
L'ÉTAT FUÏT  
NOUS  
RESTONS

Samy Archimède

*Aliès a-walc'h e vez aozet manifestadegoù gant ar c'hevredigezhioù lec'hel evit sachañ evezh diwar-benn saotradurioù an uzin produiñ temz, Yara.*

kas d'ar red-korf, dislonkadennoù hag « efedoù grevus war ar gwad ». [Lennit hon enklask : « Breizh : c'hwezh an amoniak er maez »].

### « AMAÑ EZ EO ARVARUS PEP HINI EUS HON MICHERIOÙ »

En un atalier anvet « NPK » e vez fardet temz kemplezh. Tieri<sup>6</sup> en deus bet labourer war al lec'h-se etre 2001 ha 2019, pa oa prestatour chafodour. Anavezout a ra mat an atalier-se, ha poaniuseo evitañ kas ar mare-se d'e soñj en-dro. « Tremenet 'meus sizhunvezhioù ha mizioù du-se, ne oa ket gwashañ lec'h da labourat ! Spontus e oa kement a uloc'h a veze bepred, ha tamm gwenterezh ebet

biskoazh. Ur gwiskad uloc'h gouledennet e pep lec'h, un tamm evel an erc'h, hag a droe da fank abalamour ma tivere an dour el lestr. Gwashañ lec'h biskoazh ! Den ne lakae ur maskl, na gwech ebet n'on bet rediet lakaat unan. »

Estreget en atalier NPK e vez lakaet yec'hed ar vicherourien en arvar war lec'hienn Yara. « Amañ ez eo arvarus pep hini eus hor micherioù, en un uzin Seveso live uhel eo » evel ma tegas da soñj Philippe Nicolas, dileuriad CGT ha sekretour ar bodad yec'hed, surentez ha doareoù labourat (CSSCT) al lec'hienn . « Pal ar jeu a zo mestroniañ anezho ar gwellañ ma c'heller. » Penaos 'ta ? A-drugarez da « sistemoù diboultrennañ, d'ar maskloù FFP3 a warez diouzh partiklennoù moan,

6] An dud anvet gant un anv-bihan hepken zo bet dianavelaet.



Samy Archimède

*Meur a-wech eo bet taget Yara gant ar prefeti. Ar c'hevredigezhioù lec'hel a c'houlenn e vefe chomet a za da broduiñ ganti.*

*pe gant tokarnioù klok aer gwentet silet enno a gaver en atalieroù lec'h ma c'heller kavout ulloc'h. Kalz a draoù a c'heller lâret diwar-benn Yara, eme Philippe Nicolas da echuiñ, met a-bouez-bras eo amañ ar surentez ».*

N'eo ket tre ar santimant en deus bet Tieri pa veze o labourat en atalieroù NPK, ha meur a wech e oa bet eno betek 2019. Rebechiñ a ra d'an embregerzh bezañ chomet hep staliañ « ez-tennerioù aer », ha da vezañ chomet gant kemennadennoù dizarbenn a seurt-se : « ret eo gwiskañ ur maskl » skritellet ouzh dor ar savadur. Piv da grediñ eta, dileuriad ar sindikad pe an hini a oa micherour prestatour ?

Delphine Guey, e penn ar c'hehentiñ e ti Yara Frañs, a embann diouzh he zu « e vez aveet implijidi Yara Frañs en ur zoujañ ouzh ar reolennadur, hag eus an

*holl normoù surentez lakaet da redi gant ar vicher ».* Everti ma kadarna Philippe Nicolas : « kizidik-tre omp war zavez ar c'hleñvedoù micherel, ha gwech ebet n'eo bet diskoachet hini ebet ganeomp en uzin ar Voustoer », ha pa vefe e-touez ar vicherourien war o leve, emezañ c'hoazh. War ul linenn dreut e vale sindikad penañ Yara, pa glask war an dro difenn ar vicherourien hag un ostilh labour er-ruet un tamm mat re gozh.

## **UL LABOURADEG DINDAN WASK MUR A C'HOURC'HEMENN**

D'an 30 a viz Here 2023 e oa bet embannet gant Yara Frañs e oa difredet diouzh o labour 139 implijad diwar an 171 outo, hag e oa lakaet termen d'ar produiñ temz war al lec'h-se e rumm « Seveso live uhel », da lâret eo unan a zo

riskloù bras gwallzarvoudoù penañ en e-ser. Pezh zo, ne oa ket bet kaset ar c'heloù e oa marvet un implijad 6 devezh a-raok. Gant ar steuñv difredañ-se e oa disoc'h gant hanter-kant vloaz eus istor un industriezh<sup>7</sup>.

Kozh-mat e oa erru al labouradeg bet digoret e 1972, hag adprenet e 2004 gant Yara. Sklaer ha splann eo Philippe Nicolas pa ziskuilh an dibaboù bet graet gant ar rene-rezh he doa « *paouezet da bostañ arc'hant un nebeut bloavezhioù zo dija* » evit modernaat o staliadurioù, pezh en deus lakaet anezho da gaout en tu all da 700.000 euro a gastizoù dindan daou vloaz<sup>8</sup>, abalamour da redioù ar Prefeti ha ne oant ket bet heuliet<sup>9</sup>. Ha dibabet e vefe bet gant an embregerezh norvegian etrevroadel laosker an traoù da « vreinañ », kuit da zispign ar 35 da 45 milion a euroioù ret, hervez istimadur ar Prefeti nevez zo, evit lakaat an embregerezh diouzh ar reolennoù en-dro<sup>10</sup> ?

Abaoe ur pemzek vloaz zo bennak emañ servijoù ar Stad o rediañ uzin

# « Chomet eo az a Yara da blantañ arc'hant abaoe pell. »

Yara ar Voustoer da zoujañ diouzh ar reoliadurioù a-fed surentez hag endro<sup>11</sup>. Re a bartikulennoù munut distaolet en aer, distaoLIOù azot ha fosfor er stêr Liger aet en-tu all d'ar pezh zo aotreet, doareoù berniañ an temz hag an amoniak er-maez lezenn... En 2023 e oa lec'hienn produiñ Yara e-touez ar pemp lec'h industriiel bet lakaet dindan evezh kreñvaet gant ministrerezh an treuzkemm ekologel<sup>12</sup>. Ur stignad bet staliet nevez zo hag a dalvez da « *wellaat dizarbenn ar gwallzarvoudoù industriiel ha kreñvaat gwarez ar boblañs* ».

7] « Histoire de l'industrie des engrais dans l'estuaire de la Loire à l'époque contemporaine », tezenn doktorelezh, Skol-veur Naoned, Philippe Martin, miz Gwengolo 2018

8] Diferad-prefed 2023/ICPE/150 diwar-benn an annez, Staliadurioù rummet evit gwareziñ an endro kevredad Yara France e Montoir-de-Bretagne, prefeti al Liger-Atlantel, 12 a viz Ebrel 2023

9] Diferad-prefed 2024/ICPE/057 diwar-benn an annez, Staliadurioù rummet evit gwareziñ an endro, kevredad Yara France e Montoir-de-Bretagne, prefeti al Liger-Atlantel, 20 a viz C'hwevrer 2024

10] Diferad-prefed 2023/ICPE/213 diwar-benn an annez, Staliadurioù rummet evit gwareziñ an endro, kevredad Yara France e Montoir-de-Bretagne, prefeti al Liger-Atlantel, 12 a viz Even 2023

11] Ar steuñv evit lakaat ar c'hevredad Yara France da glotañ gant Montoir-de-Bretagne, ministrerezh an Treuzkemm ekologel ha kenstagded an tiriadoù, 14 a viz Mae 2024

12] « Sécurité des sites industriels à risques : mise en place de la vigilance renforcée », lakaet enlinenn e miz Here 2023, lec'hienn web ministrerezh an Treuzkemm ekologel ha kenstagded an tiriadoù, pajenn lennet e miz Genver 2025



Samy Archimède

*Thierry Noguet a zo maer Moustier-al-Loc'h. Taget eo bet gant gourdrouzoù meur a wech evit bezañ sachet evezh diwar-benn saotradurioù Yara.*

Abaoe miz Du diwezhañ ne vez ket produet a demz ken gant al labouradeg<sup>13</sup> met n'eo ket evit-se n'eus ket a riskl ken. « *Chom a ra un tamm mat a evezhiañ d'ober dre m'emañ c'hoazh stokoù danvezioù e-leizh : amoniak, nitrat amoniom tomm, beolioù trenkenn, ha kement zo* », a zispleg Philippe Nicolas. « *Ret eo mirout ur skipailh emellerezh kenkaz e vefe un tan-gwall pe ur riskl teknologel bennek, hag ur skipailh kempenn.* » Ha n'heller ket tremen hep bezañs tud war al lec'h, evel m'eo bet gwelet da geñver an troc'h tredan hollek bet c'hoarvezet d'an 29 a viz Meurzh. Div eurvezh zo bet ezhomm a-raok ma vefe bet gallet loc'hañ ar c'haner tredan, hag alese e oa

an amoniak dindan wask, gant ur riskl a darzhadenn<sup>14</sup>.

38 devezh goude ma vefe bet rediet gant ar Prefeti da bleidiñ gant kudennoù tredan<sup>15</sup> an uzin just a-walc'h, e oa bet kemenn reuziad el labouradeg. Ha sirius a-walc'h e oa bet kavet gant ar prefed evit ma vefe galvet rener Yara Frañs da zont da vodad heuliañ al lec'hienn (CCS) evit un emvod dreistordinal, asambles gant rener Yara Europa ar Su, dileuridi ar sindikadoù, dilennidi ar vro ha kevredigezhioù annezidi ar c'harter. E 2018 e oa bet ar prefeti o rediañ Yara da gemer e karg surentez an implijidi c'hoazh, « *ha pa vez distaolet danvezioù pistrius peurgetket* ».

13] Kemennadenn d'ar gazetennerien, prefeti al Liger-Atlantel, 20 a viz C'hwevrer 2024

14] « Rupture d'un réservoir cryogénique d'ammoniac. Le 20 mars 1989. Jonova - Lituanie (URSS) », danevell gwallzarvoud embannet e 2007 war lec'hienn web an diaz Analyse, Enklask ha Titouriñ diwar-benn gwallzarvoudoù ministrerezh an Treuzkemm ekologel ha kenstagded an tiriadoù, pajenn lennet e miz Genver 2025

15] Diferad-prefed 2024/ICPE/059 diwar-benn an annez, Staliadurioù rummet evit gwareziñ an endro, kevredad Yara France e Montoir-de-Bretagne, prefeti al Liger-Atlantel, 20 a viz C'hwevrer 2024

D'an 7 a viz Mae 2024 eo bet embannet gant ar gouarnant<sup>16</sup> un diell (a oa echu abaoe miz Even 2023) a lak war wel ar riskloù zo pa vez stoket amonitrat. Hervez an dokumant e rankfe bezañ difennet implijout amonitrat dozadur uhel e Frañs. Daou embregerezh a vefe taget dre vras e Breizh : Yara e Mouster-al-Loc'h hag an Timac Agro e Sant-Maloù. Kaoz e oa eus outi en hon enklask kentañ<sup>17</sup>.

Evit pezh a sell ouzh ar redioù-se digant ar prefeti, diwar-benn

al labouradeg o serriñ, diwar-benn ar saotradurioù o doa roet tro da Yara bezañ kastizet, ar renerien n'o deus ket asantet da gas deomp respontoù ouzh hor goulennoù.

### « YARA, GWASHOC'H N'EUS KET »

7.000 tonenn amoniak a zo berniet war lec'hienn ar Voustoer hiriv an deiz. Peadra da vezañ ankeniet pa vezer o tremen bemdez dirak ar beolioù-se. Prefeti al Liger-Atlantel he deus lakaet ar gaoz war-eeun war ar gudenn-se koulskoude en e ziferad deiziet eus an 20 a viz Genver : « *n'eo ket dereat mirout war al lec'hienn, hag evit keit-all, ur c'hementad a zanvezioù a*

*c'hell kas da zañjerioù ken grevus kenkaz ma vefe ur gwastadur pe ur gwallzarvoud bennak* ».

Hiviziken ec'h embann renerezh Yara Frañs e fell dezho digreskiñ kementad al labour war al lec'hienn ha treiñ al labouradeg da « *termenva enporzhiañ hag unvez meskañ hag intrañ temz diwar c'houlenn* ». Ha diframmet ha

disaotret e vo neuze unvezioù produiñ al labouradeg evit ma vefe kaset da benn an treuzfurmadur-se ? Ma teufe da wir, Laorañs, un

tredaner eil-kevratur a ra labourioù disac'hañ evit meur a embregerezh, Yara en o zouez, a vefe en gortoz distreiñ di. Dreist-holl abaoe m'eo bet trec'h d'ar c'hrign-bev ar skevent a-drugarez d'un oberatadenn warlene. « *Yara, gwashoc'h n'eus ket* », emezañ taer e vouezh.

Laorañs, hanter-kant vloaz, zo eil-kevratur evit purerezh TotalEnergies dreist-holl, trede embregerezh ar vro evit pezh a sell barregezh puraat tireoul<sup>18</sup>. Ul lec'hienn rumm Seveso live uhel, evel m'emañ al labouradeg Yara. En em ledañ a ra war 700 devezh arat (350 ha), war gumun Donez (e-tal ar Voustoer), lec'h ma oa bet staliet ar re gentañ eus ar mirlec'hioù tireoul en

## 7.000 tonenn amoniak zo berniet war lec'hienn ar Voustoer hiriv an deiz.

16] « Suite à donner au rapport CGE/CGEDD de 2020 sur la gestion des risques liés à la présence d'ammonitrates dans les ports maritimes et fluviaux », danevell gouarnant, Michel Pascal, Didier Pillot, Frédéric André, miz Mezheven 2023

17] « Les engrais azotés polluent l'air des Malouins », pennad eus an enklask Breizh, c'hwezh an amoniak er maez, Caroline Trouillet, Splann !, miz Gwengolo 2021

18] « Raffineries de pétrole en France : combien y en a-t-il et où sont-elles situées ? », pennad embannet war al lec'hienn Web Anavezout an energiezhioù, pajenn lennet e miz Genver 2025

# « E plasoù zo ez eo ken kozh ma weler houarnaj-frammañ ar betoñs dindan an amzer. »

tu all da gant vloaz zo<sup>19</sup>. « *Pa sellan outi e seblant din ez eo gant an tuellennoù ez eo dalc'het ar mogerioù betoñs en o sav. E plasoù zo ez eo ken kozh ma weler houarnaj-frammañ ar betoñs dindan an amzer. Ne ro ket fiziañs da welet* », emezañ en ur varnadenn.

## UN UZIN WAR GOSHAAT DAÑJERUS EVIT AR VICHEROURIEN

Pa oa deuet Renerezh rannvroel an endro, an aveadur hag al lojeiz (Dreal) war al lec'hienn, d'an 13 a viz Here warlene,

e oa bet merzhet gant an dale a oa gant TotalEnergies war programm an enselladennoù hervez reolenn : 58 % eus an tuellennoù a rankfe bezañ bet lakaet diouzh ar reolennoù a-raok an 31 a viz Kerzu 2022, met bloaz warlerc'h ne oant ket. Gwir eo ez eus en tu all da 32.000 km a gorzennoù en holl war al lec'hienn... Diskoachet eo bet ivez gant servijoù ar Stad e oa « *koshaet pontoù an tuellennoù, pezh a c'hell kas d'an danvezioù*

*saotrus da ziverañ* ». Ouzhpenn da-se ez eo dek beol a zo bet « *dalc'het e stad da vezañ implijet* » hep na vefent bet ensellet a-raok, hervez danevell DREAL Broioù al Liger<sup>20</sup>.

Dilerc'hioù zo bet da heul an dale bet tapet gant an embregerezh evit pezh a sell an obererezhioù kempenn<sup>21</sup> : kresk niver an darvoudoù teknikel a c'hellfe lakaat en arvar implijidi zo. D'ar 21 a viz Kerzu 2022 ez eus bet galvet trumm ur skipailh eus Clemessy, merk Eiffage Energie Systèmes hag eil-kevratour TotalEnergies evit klask stankañ

19] « Présentation de la plateforme de Donges », pennad embannet war lec'hienn genrouedad

TotalEnergies Donges, pajenn lennet e miz Genver 2025

20] Danevell ensellerezh ar staliadurioù rummet, gweladenn ensellet d'an 13/10/2023, Dreal Bro al Liger, 10 a viz Du 2023

21] Diferad-prefed 2023/ICPE/139 evit lakaat annez e-keñver ar c'hevredad TotalEnergies Raffinage France, korvouiñ purerezh Donges evit reizhañ e saviad melestradurel diouzh ar reolennoù a dalvez evit ar produioù hag an aveadurioù gant riskloù, prefeti al Liger-Atlantel, 19 a viz Ebrel 2023





*Savet eo bet purerezh Donez er gumun e penn kentañ an XXvet kanvet. Ar burerezh gentañ a zo ken kozh hag ar brezel bed kentañ.*

deveradennoù diwar ur veol 30.000 m<sup>3</sup> hidrokabidennoù enni<sup>22</sup>. Mont a ra kuit an aezhennoù pistrius diwar an trelosk abalamour ma oa aet da fall ur « veskerez dre viñs » bet staliet war an tu fall da geñver ur beurfichadenn. Ar gudenn zo, hervez David Arnould, dileuriad sindikad CGT ar burerezh : n'eus ket a aveadurioù gwareziñ dereat gant an implijidi zo war al lec'h. « *Erruet int gant maskloù gwenterezh harpet (gant*

*kartouchennoù). Pezh zo, gant ar feur benzen<sup>23</sup> ha COV a oa war an dachenn ez int bet peurleugnet buan-tre, ha lakaet eo bet ar vicherourien war var d'ur feur benzen uhel », pa ouzer ez eo un danvez lakaet e rumm krankeiat da vat gant ar CIRC.*

*Fellout a rae da Splann ! kaout keloù digant ar vicherourien bet lakaet war var eus an danvezioù pistrius, padal eo bet dibosupl kavout roud ebet outo, ha se*

22] « Raffinerie TotalEnergies à Donges : commission de suivi de site du 12 janvier 2024 – retour sur la fuite d'essence du 22 décembre 2022 », kemennadenn d'ar gazetennerien, prefeti al Liger-Atlantel, d'an 12 a viz Genver 2024

23] Danevell enklask diwar-benn tec'hadenn ar produioù er greizenn industriell TotalEnergies Raffinage France e Donez (44) d'an 21 a viz Kerzu 2022, danevell ar burev enklask ha dielfennañ ar riskloù greantel, Pennensellerezh an endro hag an diorren padus, 6 a viz Kerzu 2023

abalamour ma c'hell a implijidi bezañ kaset war gefridi all e-barzh embregerezhioù all goude ma vefent bet tapet en un darvoud pe ur gwallzarvoud bennak. « *N'heller ket gouzout da beseurt kementad a zanvez pistrius int bet lakaet war var, rak re ziwezhat int bet kelaouet eus an heulierezh biometrologiezh a o vefe bet ret staliañ* », eme gant keuz Adrien Vaugrenard, dileuriad CFDT al lec'hienn ha danevel-ler ar bodad yec'hed ha doareoù labour (CSSCT). « *Ha m'emaint skoet klañv warc'hoazh ne c'hellint ket disklariañ ur c'hleñved micherel abalamour ma*

*ne vo prouenn ebet ez int bet war var eus danvezioù pistrius zo. Mantrus eo !* » An hevelep tregas zo gant David Arnould, paotr ar CGT.

## **UN DIOUER SPONTUS A BOSTADURIOÙ EVIT AR C'HEMPENN**

Niverusoc'h-niverusañ an deveradurioù war an tuellennoù<sup>24</sup> a zeu rak-eeun diouzh « *an diouer a bostadur arc'hant en ostilhoù labour* », hervez preder Adrien Vaugrenard. « *Daoust ma klas-ker adtapout an dale er mare-mañ, gant 10 milion a euroioù postet bep bloaz evit kempenn ha kontroliañ an tuellennoù ha korzennoù treuzdougen, emae o paeañ an diouer a bostadurioù en ugent vloaz*

*diwezhañ.* » Ur rebech all a ra an dileuriad sindikad da renerezh an embregerezh eo bezañ bet tennet daou bost-labour diwar 650 etre 2020 ha 2023 : « *breskoc'h eo aozadur al labour abaoe m'eo bet adframmet evel-se, ha dreist-holl evit pezh a sell dec'hel al lec'h a-ratre* ». E-keit ma poagn TotalEnergies da beurbaeñ an arc'hant ret evit dec'hel ar burerezh kozh e stad vat, eo loc'het

**« Ne vo prouenn  
ebet ez int bet war  
var eus danvezioù  
pistrius zo.  
Mantrus eo ! »**

diouzh un tu all gant ur chanter divent all : sevel un unvez disulfurañ a c'hellfe sañset produiñ trelosk a gasfe en aer 10 % nebeutoc'h a zioksidenn sulfur eget ar re a vez

bremañ.

Met hervez ar sindikalour ne ya ket en-dro ar chanter dindan doareoù surentez dereat evit an 300 da 400 micherour eil-kevratour (hag estrañjourien e-leizh en o zouez) a labour eno. « *Meur a wallzarvoud grevus zo bet rena-blet abaoe penn-kentañ al labourioù, en o zouez 4 a c'hellfe bezañ bet spontus* », a zispleg Adrien Vaugrenard. « *Nec'het omp ivez evit al labourerien ha n'int ket gwarezet a-walc'h e-doug ar souderezh, pa vezont lakaet war var d'ar c'hrom VI* », ur c'hompozad e rumm kankreiat da vat [Lennit hor pennad « *Le coût humain des bateaux de croisière* »].

Dibosupl eo labourat en ur bure-rezh hep analiñ danvezioù kankreiat,

24] Diferad-prefed 2023/ICPE/419 diwar-benn an annez, staliadurioù rummet evit gwareziñ an endro, kevredad TotalEnergies Raffinage France commun de Donges, staliadur puraat ha stokañ produioù tireoul, prefeti al Liger-Atlantel, 18 a viz Kerzu 2023



*Ouzhpenn 32.000 km korzennoù a zo en uzin. Lod anezho a zo re gozh ha dañjerus.*

mutagenek pe pistrius evit ar gouennañ (CMR)<sup>25</sup> : kompozadoù organek aezhidik (benzen, trikloroetilen, stiren, toluen, etilbenzen...), hidrokarbidennoù aromatek lies-kelc’hiek (kriзен, piren, naftalen...), ha kement zo. Dre ziv wech omp aet e darempred gant TotalEnergies evit gouzout penaos e oa gwarezet an implijidi diouzh an danvezioù pistrius-se, met daoust da-se n’eus ket fellet da rener ar c’hehentiñ war savenn Donez respont ouzh hini ebet eus ar goulennoù savet er pennad-mañ.

Ret eo d’an holl lec’hiennoù petrokimiek er Frañs doujañ diouzh an talvoudoù bevenn rediañ an ardizh war ar vicher (VLEP)<sup>26</sup>, evit pezh a sell ar benzen peurgetket. Met evit David Arnould, a zo ivez kasour ar c’henstroll yec’hed-labour e kevread broadel CGT an industriezhioù kimiek, un touell eo ar VLEP-se rak n’int ket diazezet war redioù medisinezeh. Displegañ a ra c’hoazh : « *Dont a ra an talvoudoù-se diwar un treuzvarc’had sokial.* » Ur skouer : d’ar 5 a viz Ebrel 2024 diwezhañ eo lakaet da

25] « Agents chimiques CMR », teuliad gant Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour ha kleñvedoù micherel, 2024

26] Roll talvoudoù bevennet an diskouezadegoù micherel, embannet d’an 3 a viz Du 2023 e lec’hienn web Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour hag ar c’hle, pajenn lennet e miz Genver 2025

dalvezout ur VLEP<sup>27</sup> nevez strishoc'h evit pezh a sell ar benzen. Padal e chom dek gwech uheloc'h eget pezh a zo erbedet gant Bodad european ar priziañ riskloù. Hag ouzhpenn-se ez eus bet roet daou vloaz d'an industriezhioù evit plegañ diouzh ar reolenn, eme c'hoazh ar sindikalour.

E-kreiz an daolenn skrijus a-walc'h, ul lutig a spi o tiwanañ abaoe daou vloaz pe dri : ar CGT o tostaat ouzh kevredigezhioù annezidi ar c'harter. Rak an hevelep stourm eo an hini evit yec'hed an implijidi pe evit annezidi

Donez, neketa ? « *Bewech ma c'hellomp dougen an hevelep goulennoù e vo graet, anat eo. Ret eo chom war evezh ouzh kudennoù yec'hed ha surentez annezidi ar c'harter evel ouzh hini ar vicherourien* », eme c'hoazh David Arnould en ur venegiñ komzoù unan eus e gamaladed kozh er CGT, Marcel Croquefer, evit reiñ ton d'e gomzoù : « *Ni eo ar vicherourien a vez levierien yec'hed ha surentez annezidi ar c'harter.* »

**Samy Archimède, Itzel Marie Diaz**

---

27] Dekred niv. 2024-307 ar 4 a viz Ebrel 2024 a laka talvoudoù bevnen an diskouezadeg vicherel redius evit gwazourien kimiek zo ha klokaat a ra, mutajened pe pistrius evit gouennañ, lec'hienn web Legifrance, pajenn lennet e miz Genver 2025

# ETRE SANT-NAZER HA DONEZ EMAÑ AR STAD O KUZHAT AR SAOTRADUR

Ouzhpenn pemp bloaz warn-ugent zo e vez kadarnaet pegen uhel eo niver an dud tapet gant ar c’hrign-bev e kêr Sant-Nazer. Daoust da-se e chom kompez darempredoù ar galloudoù publik gant ar saotrierien. Goude ma vefe bet deveret strilheoul e purerezh Donez eo bet douaret gant TotalEnergies an enklask a roe ar brouenn ma oa bet an annezidi war-var da analiñ liveoù benzen uhel-tre. Hep na vefe bet tamm respont digant ar prefeti.



- 】 Goude ma vefe bet deveret strilheoul e purerezh Donez he deus klasket TotalEnergies kuzhat un danevell a-bouez a lâr eo bet saotret an aer gant bezen, ar pezh a zo dañjerus-kenañ evit an annezidi. N’eus ket bet lâret mann ebet gant ar prefeti.
- 】 Kement a dud klañv a zo tro-dro da Sant-Nazer o deus kroget tud zo da stourm evit gouzout peseurt dañjerioù gwir a zo evit o yec’hed.
- 】 Lañset ez eus bet ur studi takad evit ma vefe muioc’h a ditouroù goulennet gant an annezidi. Met diglok da vat eo ar studi-se.

**A**er fresk a-benn ar fin ! » Pa oa erru da chom e Pornizhan (Liger-Atlantel) gant e wreg e miz C’hwevrer, e soñje da Didier Ott e oa evit tremen devezhioù plijus er ger dudi-mor pinvidik, un 12 km bennak er c’hornôg eus Sant Nazer. Hervezañ e oa erru pell-mat eus saotradur korn-bro Pariz a lakae anezhañ da basaat ingal. Kurius e oa ar politeknisian bet ijinour war an urzhiataerezh da c’houzout petra e oa sifroù Aer Broioù al Liger. Hag ur wech aet dre roll muzulioù ar gevredigezh e-karg eus kalite an aer er vro eo bet souezhet o welet e oa pell an aer da vezañ ken glan ha pezh a soñje dezhañ e vefe bet. Ha skodeget eo bet ouzhpenn da-se o welet niver tud ar vro tapet gant ar c’hrign-bev.

Ha gant roadennoù Arsella rannvroel ar yec’hed (ORS) Broioù al Liger<sup>1</sup> eo bet kadarnaet e gavadennoù : n’eo ket gwall vrvastad ar yec’hed diazad Sant-Nazer abaoe pemp bloaz warn-ugent, pa vez keñveriet gant hini peurrest departamant al Liger-Atlantel. Eno ez eo ar riskl da bakañ krign-bev ar skevent

eus 19 % uheloc’h eget e peurrest an departamant. Ha splannoc’h c’hoazh an diferzh evit pezh a sell ouzh nive-roù krign-bev ar fri, gourlañchenn, treuz-gouzoug, pe gorzenn-voued : 28 % ouzhpenn. En holl d’an holl, hervez an ORS e varv gwazed Sant-Nazer a-raok o 65 bloaz aliesoc’h gant ur feur 42 % uheloc’h eget keidenn an dud ar Frañs<sup>2</sup>. Evit Michel Bergue, bet is-prefed Sant-Nazer, sklaer eo an displegadenn : « *n’eo ket ar saotradur industriel a zo pennkaoz d’ar c’hrign-bev, ar butun hag an alkool ne lâran ket* ».

### **Alies e varv gwazed Sant-Nazer a-raok o 65 bloaz.**

Komzoù distaget e 2019 hep tamm diazez skiantel, peadra da sevel reuz e-touez micherourien Sant-Nazer, evel m’hon eus bet

tro da glevet e-doug hon enklask.

Kaer he deus Sant-Nazer bezañ bordet gant aodoù kaer, ha bezañ tost d’ar Baol ha da Bornizhan, chom a ra ur gêr a industriezhioù ma kaver enni maged pistrius Chanterioù an Atlantel<sup>3</sup> e-tal dilerc’hioù livaj Airbus hag aezhennoù o eil-kevratourien, hervez lec’h ma c’hwezh an avel. Hag e c’heller ouzhpennañ frondoù amann Cargill<sup>4</sup>,

1] « Risque cancer sur le territoire de la Carène », S. Delacour-Billon, A. Cowppli-Bony, F. Molinié, Marilh ar c’hankoù Liger-Atlantel ha Vendée, miz Here 2023

2] « Suivi des indicateurs d’état de santé des habitants de la Carène, Principaux résultats des études menées par l’ORS et le Registre des cancers de Loire-Atlantique », J-F. Buyck, S. David, M-C. Goupil, F. Molinié, S. Delacour-Billon, A. Cowppli-Bony, 18 a viz Here 2023

3] « Fumées de soudage, un risque majeur », lec’hienn web Ensavadur broadel an enklaskoù hag ar surentez evit dizarbenn gwallzarvoudoù al labour hag ar c’hleñvedoù micherel, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025

4] « Des arômes qu’il vaut mieux ne pas trop inhaler », rouedad broadel evezhiañ ha dizarbenn ar c’hleñvedoù micherel, Vigil’Anses niv. 10 Kannadig evezhiañ an Anses, Ebrel 2020



*An embregerezh Rabas Protect a zo staliet e karter Mean-Penhoet, e Sant-Nazer.*

diwar ar sevel eoul troioù-heol, hag e-tailh da zegas kleñvedoù an alaniñ<sup>5</sup>. Met ivez aezhennoù ar saver ludu kimiek Yara (un 9 c'hilometrad pelloc'h a-denn askell), hag ar c'hediadoù organek aezhidik (composés organiques volatiles – COV) diwar burerezh TotalEnergies (12 km alese)<sup>6</sup>.

« Diouzh un tu emañ ar prefeti o lakaat ar pouez war butun hag alkool, diouzh an tu all emañ ar c'hevredigezhioù o tiskuilhañ ar saotradur industriel. Moarvat emañ ar wirionez hanter-hent », eme diouzh he zu Juliette Heinrich, medisinez hag aozerez un dezenn savet ganti e 2003 diwar-benn « faktorioù riskloù ar c'hrign-bev » er gêr-mañ. « Ma seblant

e kaver alkool muioc'h eget e peurrest ar Frañs, met n'heller ket displegañ an holl krign-bev a gaver, krign-bev ar skevent dreist-holl », emezi da Splann !. Dreist-holl pa « ne gaver roadenn ebet diwar-benn implij ar butun war dachenn kumuniezh tolpad kêrioù Sant-Nazer hag an Aber ».

Diouzh e du emañ Didier Ott o kaout diskred war ul liamm etre saotradur industriel hag ar c'hrign-bev. Dindan un nebeut bloavezhioù eo deuet ar paotr da vezañ ur gwir arbennigour war galite an aer<sup>7</sup>. Sorc'hennet eo gant an ezhomm diskoachañ ar saotrierien ha dont a-benn da zigreskiñ an arvar d'an danvezioù pistrius evit

5] « Diagnostic olfactif de l'entreprise Cargill France à Saint-Nazaire, campagne juin 2023 », diell, Aer Broioù al Liger, 28 a viz Here 2023

6] « Raffinerie TotalEnergies, évaluation des niveaux de COV, de métaux et d'acide cyanhydrique dans l'air dans son environnement à Donges, campagne de mesure 2023 », diell, Aer Broioù al Liger, miz Even 2024

7] Blog Didier Ott <https://pollution.ott.fr>

# « Gant Rabas Protect e oa bet soñjet implijout produioù lous-brein. »

an annezidi. Ezel eus Kevre Gwirioù Mab-den eo ar paotr a veze o chom en Enez-Frañs gwechall. Bremañ e stourm asambles gant annezidi a-gozh Sant-Nazer, evel Philippe Dubac pe Christian Quélard. E 2015 o deus bet savet ar gevredigezh Bevañ e Mean-Penc'hoet (Vivre à Méan-Penhoët – VAMP), diwar anv karter kozh micherourien Sant-Nazer, evit miret ma teufe da vrasaat e-kreiz o c'harter an embregerezh iskevratour a labour evit Airbus, Rabas Protec, un embregerezh ispisializet en tretiñ gorreadoù ar pezhioù kirri-nij.

« *Gant an embregerezh e oa bet soñjet implijout produioù enep-daskrign*

*lous-brein a-boan 200 metrad diouzh ur skol, ha 30 metrad diouzh tiez-annez », a gont deomp Philippe Dubac. E-touez ar produioù-se, krom VI, lakaet e renk produioù krankeiat da vat gant ar Greizenn etrevroadel enklaskoù a-enep ar c'hriagn-bev. Lez-varn velestradurel an Naoned, sezizet gant ar VAMP, he deus roet an tu d'ar gevredigezh e miz Du 2018<sup>8</sup>. Div sizhun warlerc'h koulskoude eo bet*

*sinet gant ar prefeti<sup>9</sup> un diferad a roe an tu d'an embregerezh da genderc'hel da implijout ar produioù-se. Ha diwar beseurt arguzennoù ? Gwareziñ « an interest hollek » e-tal « efedoù ekonomikel ha sokial an embregerezh ma teufe an embregerezh Rabas Protec da baouez hag e pegen skoet e vefe hentenn rannvroel filierenn ar sevel kirri-nij ». Ma ne vefe ket trawalc'h, nebeut goude ez eus bet diskleriet gant ministrerezh an Treuzkemm ekologel ur reked en enep da ziviz lez-varn velestradurel an Naoned<sup>10</sup>. Un diviz hag a oa « a-du gant yec'hed annezidi ar c'harter », eme prezidant Vamp, Christian Quélard, feuket un tamm anezhañ. N'en deus*

8] Diviz niv. 1609021 Lez-varn velestradurel Naoned, kaset d'ar gevredigezh Vivre e Méan-Penhoët d'an 23 a viz Du 2018

9] Diferad-prefed evit diarbennoù mirerezh niv. 2108/ICPE/309 Kevredad Rabas Protecte e Sant-Nazer, prefeti al Liger-Atlantel, 7 a viz Kerzu 2018

10] Reked niv.19NT00439 eus ministrerezh an Treuzkemm ekologel ha kengret kaset da lez melestradurel galv Naoned, 28 a viz Genver 2019



ket fellet ar ministrerezh respont ouzh hor goulennoù.

## **MERET EZ EUS BET UR STUDI TAKAD DIGLOK A-WALC'H**

Dek vloaz zo emañ kevredigezhioù an annezidi o kas ur stourm, gant petisionoù<sup>11</sup>, manifestadegoù, emvodoù foran, ha dre gemer perzh e pennadoù kazetennoù evit klask sklaeraat petra eo efedoù yec'hedel ar saotradur industriel. Adalek 2013 emañ an AEDZRP, kevredigezh annezidi ar c'harter, diazezet e Donez, lec'h m'emañ ar burerezh TotalEnergies), ha goude-se ar VAMP, o c'houlenn digant ar prefeti ma vefe lakaet e pleustr ur studi epidemiologel<sup>12</sup>. En aner. Mantret gant sifroù feur marvedigezh dre grign-bev<sup>13</sup> annezidi ar gêr, e oa aet ar senedour Yannick Vaugrenard (PS) hag ar gannadez Audrey Dufeu (LREM) betek ar Vodadenn Vroadel ha da vinistrerezh ar yec'hed evit dougen mouezh ar c'hevredigezhioù.

« N'heller ket degemer e ranker gortoz ken pell evit ma vefe lakaet e pleustr ar studi goude ma vefe bet embannet sifroù warlene », setu pezh a skrive Audrey Dufeu,

dilezet he c'harg ganti abaoe, en ur gemennadenn d'ar gazetennerien e miz Here 2020. Ha setu ar prefeti da asantiñ reiñ dorn pemp miz war-lerc'h. Met e-lec'h kre-giñ gant ur studi epidemiologel e tibab ur studi takad nemetken<sup>14</sup>, gant ar pal anavezout eienenn ar saotradur ha priziañ ar riskloù yec'hedel. Meret eo ar studi-se gant ur c'homite durc'hadur strategel. Eno e kaver is-prefed Sant-Nazer, Renerezh rannvroel an endro, an aozañ tiriad ha lojeiz (Dreal), met ivez burevioù studi, enklaskerien ha kevredigezhioù evel ar VAMP hag an AEDZRP.

### **«200 lec'hienn » a c'hellfe bezañ saotrus ha « 47 danvez » pistrius da geñver studi an takad.**

Evit respont ouzh goulennoù Splann !, eo bet embannet gant prefeti al Liger-Atlantel e oa bet anavezet « tost da 200 lec'hienn » a c'hellfe bezañ saotrus ha « 47 danvez » pistrius da geñver studi an takad. Evito ez eo ar sifroù-se ur brouenn m'eo « sirius an enklask » E gwirionez, darn vras an embregerezhioù n'eo deus degaset respont ebet d'ar goulennoù bet kaset dezho gant servijoù ar Stad, pa veze klasket renabliñ an danvezioù dañjerus produet pe berniet ganto, pe c'hoazh an danvezioù saotrus dilaosket ganto. N'eus nemet 16 embregerezh war an 94 ha n'int ket rennablet evel « dañjerus evit

11] « 800 signataires pour une étude sanitaire », Ouest-France, 17 a viz Meurzh 2019, pajenn web bet gweladennet e miz Genver 2025

12] Rentañ-kont eus poellgor lec'hel kelaouiñ ha kendivizout Donges d'ar 17 a viz Kerzu 2013, isprefeti Sant-Nazer, 25 a viz Meurzh 2014

13] « Cartographie du risque cancer sur la zone de la Carène Communauté d'Agglomération de la région nazairienne et de l'Estuaire », S. Delacour, A. Cowpli-Bony, F. Molinié, marilh ar c'hankoù Liger-Atlantel ha Vendée, miz Mae 2019

14] « Étude zone sur le secteur de la Carène », 20 a viz Here 2023, Renerezh-rannvro an endro, an terkañ hag al lojeiz, Prefeti Broioù al Liger, pajenn web gweladennet e miz Genver 2025



*Diaes eo chom hep klevet ar c'hwezh a zeu eus uzin eoul Cargill hag a vez implijet evit magañ al loened.*

an endro » o deus roet titouroù<sup>15</sup>.  
 Un dra all a vank d'ar studi : an danvezioù dreist-munut, ha mogedoù ar soudiñ, ar gudenn a gaver stank e Chanterioù an Atlantel, zo bet lakaet er-maez eus tachenn ar studi, daoust m'emaint danvezioù kankreiat gwiriet [lennit ar pen-nad kentañ « *Koust denel al listri dudi* »].

Evit pezh a sell an danvezioù saotrus a gaver el leur, da gentañ-penn e oant bet lakaet er-maez ar studi. Diwar goulennoù groñs ar c'hevredigezhioù eo bet asantet gant ar prefeti kas da benn ez-tennadennoù douar diwar al

**« N'eo al liorzhoù nemet ul lodennig dister eus an takad da studiañ. »**

liorzhoù, a-benn ar fin. Met trikamardet eo Thierry Lebeau, kelenner e skol-veur an Naoned hag arbennigour war saotradur an douar abaoe ugent vloaz, hag ezel eus ar c'homite henciañ strategel studi an takad, gant an doare ober : « *izel-tre eo niver an ez-tennadennoù raktreset (etre 14 ha 36) ha ne c'hell ket reiñ tu da dennañ klozadurioù a c'heller fiziañ enno evit pezh a sell ouzh riskloù an dud war var ouzh kontammadur an douaroù war an takad. Hag ouzhpenn da-se* », emezañ c'hoazh « *n'eo al liorzhoù nemet ul lodennig dister eus an takad da studiañ* ». Ne seblant ket gwall nec'het ar

15] « Étude de zone sur le territoire de la Carène, Saint-Nazaire, phase 1 », danevell Renerezh-rannvro an endro, an terkañ hag al lojeiz, 20 a viz Here 2022

prefeti gant stad an dourioù danzouar kennebeut : « Ne vez ket implijet darn vras ar puñsoù. Ha pa vezont ne vez nemet evit dourañ al liorzhoù pe/hag ar plant enno. » Fiziet eo bet en Ajañs rannvroel ar yec'hed (ARS) koulskoude ur c'houlzad ez-tennadenoù e-barzh puñsoù prevez Sant-Nazer. Hag an disoc'h kalz izeloc'h ar saotradur d'ar metaloù pounner eget ar re a oa bet diskoachet bloaz zo gant ar gevredigezh VAMP.

Peseurt kred dereiñ neuze d'ar studi takad, ma oa bet graet adalek roadennoù ken bihan, dister zoken, ha gant doareoù skiantel douetus ? Ur goulenn a zalc'h da chalañ ar c'hevredigezhioù annezidi ar c'harter. Evit Didier Ott, a oa ijinour war an urzhiataerezh, e ranke derc'hel da damall ar saotrierien ha da lakaat gwask war ar galloudoù foran. Evit-se en deus renablet an holl eienenoù saotradur industriyel a gaver en aber. Bewech ma vez manifestadegoù dirak an is-prefeti e vez o tibunañ gant ur banell vras stag outañ, warnañ renabl ar « skignerien danvezioù saotrus dañjerus en aer ». Evel da skouer d'ar 14 a viz Here 2023, da geñver ur vodadeg a-enep ar saver ludu industriyel Yara : « Dav 'vefe d'unan bennak displegañ din petra zo kaoz e kaver e Sant-Nazer daou savlec'h a vez o vuzuliañ an dilaoskadennoù gaz diwar ar c'hirri hag an tomme-rezhioù dre goad, met hini ebet hag a vefe o vuzuliañ ar saotradur industriyel ! », eme c'hoazh dileuriad an AEDZRP e-barzh ar gevredigezh Aer Broioù al Liger.

Rak karget eo ar gevredigezh-se da evezhiañ kalite an aer e vro, en ur jediñ feur hollek kalite an aer bemdez, en ur

deurel kont eus pemp elfenn saotrus : ar rannigoù gros, (anvet PM10), ar rannigoù munut (PM2,5), an ozon, an dioksid nitrogen hag an dioksid sulfur.

« Gant ministrerezh an treuzkemm ekologel eo bet diazezet al listenn-se », a resisa deomp David Bréhon. Rener Aer broioù al Liger, en ur anzav memes tra bevennoù e gefridi : ne vez ket muzuliet an danvezioù saotrañ kankreat a vez eztaolet bemdez gant an industriezhioù evel purerezh TotalEnergies. Er-maez eus ar c'hask ar c'hediadoù organek aezhidik (composés organiques volatiles pe COV), an hidrokarbidennoù aromatek polikelc'hiek (COV)... « N'eus



Didier Ott, o chom e Pornichet (44) abaoe 2018, a zo deuet da vezañ arbennig war ar saotradurioù a vez e bae Sant-Nazer. Gantañ eo bet renablet an holl titouroù evit sevel ur gartenn kaset gantañ d'a' vanifestadegoù.

ken met 11 danvez saotrañ hag a vez reolenet », a resisa, padal e kaver « degadoù ha degadoù all c'hoazh ». Evit Didier Ott, « bouzarus eo an tav bras, mouchet e vez daoulagad an dud evit na welfent ket ar saotradur, e-giz ma ne vefe ket deus outañ ! ».

## KUZHET EO BET UN DANEVELL DIZALC'H GANT TOTALENERGIES

Gant diouer muzulioù an danvezioù-saotrañ war ar bemdez n'heller ket gouzout da vat petra eo feur gwirion an danvezioù lakaet an dud en ardizh ganto ma vefe ur gwallzarvoud industriel. Pezh zo c'hoarvezet d'an 21 a viz Kerzu 2022 p'eo deveret 770.000 litrad trelosk diouzh ur penton<sup>16</sup>, pa ne veze ket dalc'het e-ratre, pezh a lakae en arvar buhez kantadoù a annezidi. Ha kaset gant an avel eo erruet an aezhennoù kontam-mus betek bourc'h Donez an deiz-se. Ha koulskoude, ken abred hag an deiz war-lerc'h e oa bet ar prefeti oc'h embann war e lec'hienn internet<sup>17</sup> : « *Strilheoul o teverañ diouzh purerezh Donez : efed ebet war yec'hed an dud er vro* ».

**« Saotradur bras  
goude ma oa bet  
deveret 770.000  
litrad a dour-tan. »**

E-barzh danevell Aer Broioù al Liger<sup>18</sup> bet embannet miz war-lerc'h ar gwallzarvoud e oa merket e oa bet kavet kompozadoù organek aezhidik en o barr en aer koulskoude.

Strafuilhusoc'h c'hoazh : an enklask distokad bet fiziet en Ensavadur Broadel an endro hag ar riskloù (Ineris)<sup>19</sup> gant TotalEnergies zo chomet luget ha koachet zoken e tiretennoù an embregerezh war an tireoul. Peurechu an danevell d'an 20 a viz Genver 2023, ha splann a-walc'h e tis-

koueze penaos e veze stank ar c'hementad benzen<sup>20</sup> (un danvez lakaet e renk kankreiat hep tamm douetañs) en aer e karterioù

zo eus Donez da liveoù en tu all d'ar pezh a c'heller degemer evit an dud, e-doug ar pevar devezh war-lerc'h an deveradenn strilheoul. N'eus ket bet c'hoant TotalEnergies respont d'hon c'houlennoù.

War a seblant n'eo ket bet plijet disoc'hoù an enklask-se neuze da TotalEnergies, daoust ma oa bet savet gant un ensavadur ispisializet hag anavezet evit e emrenezh. Jedet en-dro neuze an distaoladennoù, en ur

16] Danevell enklask diwar-benn tec'hadenn ar produioù er greizenn industriel TotalEnergies Raffinage France e Donges (44) d'an 21 a viz Kerzu 2022, danevell ar burev enklask ha dielfennañ ar riskloù greantel, Pennensellerezh an endro hag an diorren padus, 6 a viz Kerzu 2023

17] « Fuite d'essence à la raffinerie de Donges : des odeurs gênantes mais pas d'impact sanitaire selon la préfecture », France 3 Breizh, 22 a viz Genver 2022

18] « Qualité de l'air liée à l'incident de la raffinerie de Donges, rapport n°2 des mesures effectuées », Aer Broioù al Liger, 13 a viz Genver 2023

19] « Exploitation des données AIR pour évaluer les risques sanitaires suite à une fuite d'essence », diell, Ineris, 20 a viz Genver 2023

20] « Benzene », *Evaluation of Carcinogenic Risks to Humans*, volume 120, IARC monographies, 2018



*E-kichen tout eus an tiez emañ ar poulloù dour-tan. Ar pezh a zo dañjerus evit an annezidi, evel m'eo bet diskouezet gant gwallzarvoud an 21 a viz Kerzu 2022.*

implijout ur vetodologiezh all ar wech-mañ, evit dont a-benn da sevel, ur pevarzek miz bennak war-lerc'h, un danevell kontrol leun gant formulennoù matematik ha grafikoù<sup>21</sup>... bet diskaret raktal gant Ineris en ur « *gemennadenn kritikel* »<sup>22</sup> bet lennet gant *Splann* !.

Gant ensavadur broadel an endro hag ar riskloù eo lakaet war-wel « *doareoù jediñ di-azas* », « *meur a ziresisted* » kement ha roadennoù pennañ n'heller ket gwiriañ, ar c'hementad a strilheoul bet deveret da goulz ar gwallzarvoud paneveken. Hag evit pezh a sell ouzh priziañ ar riskloù yec'hedel, danvez pennañ goulenn ar prefeti, « *n'eus*

*ket diouti* » en danevell kinniget gant TotalEnergies, hervez Ineris.

Penaos displegañ seurt mankoù ? Petra zo kaoz n'eo ket bet kelaouet tud Donez, un 20 miz bennak war-lerc'h an darvoud, war ar c'hementadoù benzen bet distaolet en aer hag a lakae an dud en arvar ? Evit respont ouzh goulennnoù *Splann* ! bet savet d'an 30 a viz Eost diwar-benn an darvoud just a-walc'h, eo bet lâret gant prefeti al Liger-Atlantel « *e oa bet meur a gelaouadenn e-liamm gant ar gwallzarvoud, ha kaset da dud e-karg ar vro, embannet e oa bet evel-se war internet muzulioù war galite an aer, hag aozet un emvod kelaouiñ war an danvez-se e miz*

21] « Analyse de l'impact des émissions atmosphériques de benzène à la suite de la fuite du bac d'essence P551 de Donges en décembre 2022. Complément et scénario alternatif Révision après échange avec les équipes de l'Ineris du 19/01/2024 », diell TotalEnergies, 6 a viz Meurzh 2024

22] « Avis critique relatif à l'analyse de l'impact des émissions atmosphériques de benzène à la suite de la fuite du bac d'essence », diell, Ineris, 31 a viz Mae 2024

Genver 2024 ha savet ur gemennadenn d'ar c'hazetennoù da heul, da skouer ». Met respont sklaer ebet d'hor goulennoù daoust da-se. « Sklaer eo n'helle ket chom hep gouzout e oa eus danevell Ineris bet kaset da DotalEnergies miz war-lerc'h an deveradenn strilheoul, eme un den tost eus an afer en deus c'hoant chom disarv. Sebezet-bras on. Ur wech c'hoazh emañ ar Stad o klask koachañ ar c'hudennoù en ur livachañ ar wirionez », emezañ digalonekaet.

Ken abred ha miz Genver 2023 e oa bet an AEDZRP o lakaat ar galloudoù foran war ziwall war ar c'hementadoù benzen paket gant an annezidi, ha tamall a ra « ar vogidell bet taolet gant an embregezh gant bennozh ar Stad ».

D'ar gwener 6 a viz Gwengolo 2024 e vo eus un emgav eus ar gomision e karg da heuliañ ar pezh a c'hoarvez en uzin-mañ. Sañset e servij ar gomision-se evit ma vefe titouret mat an dud o chom tro-dro. Bodet e vez ur wech ar bloaz an is-prefed, TotalEnergies, gopridi an uzin, ar c'humuniou, kevredigezhioù tud o chom tro-dro hag ajañs ar yec'hed. Diaes e vo d'an is-prefed ha da ajañs ar yec'hed chom hep respont d'ur goulenn : penaos heuliañ an dud a c'hall bezañ klañv, ugent miz warlerc'h hag hep ur studiadenn yec'hedel mat ?

Evit TotalEnergies, n'eus ket afer kaout seurt goulennoù. Ganto eo bet skrivet

ur sintezenn diwar-benn ar gwallzarvoud hag a vo kinniget en emvod da zont. Setu ar pezh a vez skrivet<sup>23</sup> : « N'eus arouez ebet bet kaset da ajañs ar yec'hed a c'hallfe lakaat douetañs war surentez an dud tro-dro. Ma vije bet eus ur riskl evit yec'hed an dud, e vije bet ur riskl bihan. »

Aet eo kevredigezhioù annezidi ar c'harter war-raok war dachennoù zo, daoust d'an darempredoù stegn gant ar galloudoù foran, ha krouet o deus liammoù gant an enklaskerien hag an aozadurioù sindikad. Deuet int da vout un eienenn keloù n'hell ket kazetennerien ar c'hazetennoù pemdeziek rannvro ober hepto. O stourm a gas da soñj d'an hini kaset abaoe 14 vloaz e Fos-sur-Mer (Genoù-ar-Ron) gant annezidi, implijidi, dileuridi sindikad hag enklaskerien e-kreiz un ensavadur eko-keodedour evit anaoudegezh ar saotradurioù (IECP). Ganto e vez kaset studioù-perzhiañ gant ar pal anavezout al liammoù etre ar maged eztaolet gant ar greizenn petro-kimiek ha yec'hed ar boblañs. Pa ne veze muzuliet nemet an elfennoù PM10 [ar re vrasañ], bremañ eo bet staliet gant an IECP ur stignad evit muzuliañ an elfennoù dreist-munut, ar re zañjerusañ evit ar yec'hed. Ar re a zo chomet er-maez eus studi takad prefeti al Liger-Atlantel, just a-walc'h.

**Samy Archimède**

---

23] « P551 Conclusions étude Ineris », diell evit kinnig d'ar CSS d'ar 6 a viz Gwengolo 2024

# UN HÊREZH DIAES DA LONKAÑ, HINI PUREREZH DONEZ

Degadoù bloavezhioù-pad eo bet purerezh TotalEnergies Donez oc'h itrikañ war ar gumun a-bezh e-ser goprañ uhel e implijidi ha degas d'an annezidi gounidoù dreistordinal war an tailhoù. Padal e vez tud Donez o vevañ dindan gourdrouz al lec'hienn Seveso, e-keit m'eo aet da get kazi an holl spletoù sokial.



- 】 A-drugarez d'an tailhoù lec'hel paeet gant ar burerezh he deus gellet kêr Donez mont war vrasaat ha paeañ ur bern savadurioù publik.
- 】 War 80 devezh-arat e oa bet savet an uzin e 1955. Hiziv eo bet astennet war 700 devezh-arat en ur gemer plas d'ar gêr.
- 】 N'eo ket ken kreñv ken al liamm e-tre ar burerezh hag an annezidi : lod anezho a labour evit embregerezhioù all bremañ.

**B**iskoazh n'ez eus bet ul lec'hienn ken uhel e live teknikel ! Salioù kontroliñ zo a denn eus logelloù kirri-nij. » Gwrac'h eo Rémy Klein gant e labour war an eoul-maen. Pell zo emañ war e leve bremañ, ha chomet eo tost e galon ouzh purerezh Donez el Liger-Atlantel, lec'h m'eo bet sterner etre 1976 ha 1996. « *Pa oamp studierien, ma breur Pêr ha me, hag eñ deuet da vout rener war-lerc'h, e labourermp eno pa vezemp studierien, gant ar garg a skoazeller-oberataer. Gounezet e veze ganeomp tost div wech pezh a c'houneze hon tad a oa micherour e Chanterioù an Atlantel !* ».

« *Oadvezh aour* » ar burerezh perc'hennet gant Antar e oa da neuze, pa oa echu gant an eil stroñs an tireoul (1979), hervez Rémy Klein : « *Kement hini a glaske skeiñ ouzh an nor da c'houl' digor ti Antar da neuze ! 14 miz gopr a veze ganeomp, hag un adc'hopr dre gementad a veze roet e miz C'hwevrer, aet e oa ar maout ganeomp da c'hoari ar sac'h !* », emezañ c'hoazh, entan en e vouezh. « *Diouzh an hañv e veze aozet kreizennoù vakañsoù paeet gant an embregerezh ha kaset ar vugale div wech ar sizhun war draezhennoù ar Baol.* »

Hag ouzhpenn da-se e veze kinniget « *lojeizoù-kar g* » evit lod eus ar sternerien, ha tiez dereat o feurm evit ar vicherourien. E berr gomzoù « *gwir araokadennoù sokial evit annezidi Donez a veze kinniget gant ar burerezh* », eme an hini a oa bet sterner e-barzh an embregerezh tireoul e dibenn e vuhez micherel.

E-doug degadoù bloavezhioù eo bet Donez, ur 15km bennak eus Sant-Nazer, o tennañ gounit eus gant an adc'hounidoù war an tailhoù diwar Antar, Elf, ha Total<sup>1</sup> goude-se (bet perc'henned al lec'hienn) ha diwar o is-kevratourien.

E-burev bras an ti-kêr omp bet degermeret gant François Cheneau, maer Donez abaoe 2014. Keuz zo en e vouezh pa gont deomp mareoù lorc'hus e kêr c'henedik : « *Gwechall e veze ul liamm kreñv etre ar gumun hag ar burerezh abalamour m'eo bet tapet gounidoù un tamm mat uheloc'h eget pezh a veze gant kumunioù all hervez niver o annezidi.*



Setu ti-gar kozh Donez

Lilian Gallet

1] Taosoù war ar font, titouroù tennet eus ar roll hollek eus 1999, Pennrenerzh an tailhoù



Taos war ar font ha taos micherel ar burerezh<sup>2</sup> a zegase tamm-pe-damm an tri c'hard eus gounidoù ar gêr. Bet hon eus bet ur stad-kêr e 1965, ur poull-neuiñ e 1968, ha kalzik a draoù all ! », eme c'hoazh François Chéneau.

Savet ez eus bet evel-se teir sal an holl sportoù, ur vediaoueg, ur sal abadennoù, ur sinema, un ti evit ar yaouankiz... Liammoù strizh e veze etre ar gêr hag ar burerezh, ha merzhet e veze tre betek ar c'huzul-kêr : « *Eilmaer on bet da René Drollon, a oa maer hag implijad ar bure-rezh. En e raok e oa bet Alexandre Gravelle (war e leve, 96 vloaz hiriv an deiz), a oa bet e karg eus ar surentez [...] Er c'huzul-kêr e oa un den a oa war e leve diouzh ar burerezh nevez a oa, koulz hag un den a labour e c'hoazh er burerezh.* »

## **PUREREZH HA IS-KEVRATOURIEN TRO-DRO DEZHO**

A-drugarez d'an adc'hounidoù taosoù fonnus-mat ha d'ar spletoù niverus a veze roet d'ar c'hopriddi eo bet gouest ar greizenn eoul-gimiek da grignat tamm-ha-tamm ul lodenn gaer eus tachenn ar gumun hep na vefe bet savet re a reuz gant an annezidi. Padal eo en em gavet un niver bras a dud o vezañ o chom un nebeut kantadoù metradoù diouzh ar flammerenoù pe diouzh ar pentonioù,

# « Gwechall e veze ul liamm kreñv etre ar gumun hag ar burerezh. »

hag annezidi zo o deus bet ranket gwerzhañ darn eus o zachennoù, pe o zachenn a-bezh gwechoù zo zoken. Thérèse Guilhard a oa bet ganet e 1932, ar bloaz ma oa bet savet ar bure-rezh gentañ, ha n'eo ket niverus ar re zo bet test eus an istor-se. E miz Gouere 1944 e oa bet tost da goll he buhez e bombezadegoù ar re unanet a oa sañset distruj ar staliadurioù tireoul a oa etre krabanoù an Alamaned da neuze, hag unnek vloaz goude-se, e 1955, e oa deuet d'en em staliañ gant he gwaz e kêriadenn Les Maraudois. E soñj ar vaouez nevez-dimezet e oa kavout repu e-kreiz an natur, pell-mat eus an takad industriyel, tost a-walc'h diouzh ar chapel ar C'heloù Mat. « *Ganeomp e*

2] Stad kemenn feurioù telloù 1999 eus ar pevar taos eeun lec'hel, pennrenerezh an tailhoù

*Setu Thérèse  
Guihard, bevet  
he buhez  
a-bezh e Donez  
ha kollet he zi  
ganti.*



*veze pep tra hon oa ezhomm da neuze : un dachenn vras gant gwezh frouezh e-leizh, gwini, yer... Gwelet e veze al listri o verdeiñ war al Liger, ha tro-dro deomp, parkeier labour-douar nemetken. »*

Gant ar bloavezhioù o tremen e-biou, e ya tamm-ha-tamm an tachennoù labour-douar bividik etre daouarn an embregerezhioù is-kevraturien ar burerezh, ha lonket int bet dindan an ter hag ar c'harrdioù.

Hag en 2019 e pakont taol ar marv : ret eo d'ar c'houblad kuitaat o zi da viken, goude bezañ bet o chom eno e-doug 64 bloaz. O zi a oa war dachenn hent al linenn-houarn nevez da vezañ savet gant an SNCF<sup>3</sup> evit mont e-biou d'ar burerezh. An hent e-biou-se a oa deuet da vezañ un dra ret abalamour ma oa erru gronnet an hent-houarn kozh etre pentonioù hag unvezioù produiñ

ar greizenn eoul-gimiek, hag alese e oa erru dañjerus-kenañ an hent-se kenkaz ma vefe bet ur gwallzarvoud bennak. Ma ne oa nemet ti ar c'houblad a oa tonket da vout diskaret, un tri-ugent bennak a berc'henned all eo o deus ranket dilezel ul lodenn eus o liorzh pe eus o douar evit reiñ plas d'an hent-houarn. Hep menegiñ an trouzioù nozus evit ar re o deus ar burerezh da zremmwel, en tu all d'an tri-ugent TTB (TGV) ha THR (TER) a dremen war ar bemdez. Warhed tro -dre da 40 hektar e oa tachenn ar burerezh e 1955 p'eo bet savet o zi gant ar re Guihard. War en tu all da 350 hektar emañ staliadurioù eoul-gimiek hiriv an deiz.

En tu all d'ur c'hantved zo e oa erru an eoul-maen er gêriadenn-se eus bord ar stêr Liger, a oa betek-henn un dachenn ledan gouestlet d'al labour-douar ha

<sup>3</sup>] « Pour autre tracé ferroviaire », Presse Océan, 19 a viz Gwengolo 2017

geunioù. Betek ar Brezel Bed Kentañ e veze Donez ur gêr a besketaerezh ha kenwerzh ar gwin, edeier, chatal ha gwaderezed zoken, gwerzhet betek Bro-Saoz evit o vertuzioù evit ar yec'hed. « *Muturniet-bras e oa bet ma zad-kozh e-doug ar brezel, ha neuze e oa bet implijet evel mestr-micherour e mirlec'hioù eoul-maen kentañ e 1920. An hini kentañ e oa da zilezel al labour-douar evit mont d'an industriezh* », eme François Cheneau c'hoazh.

E kalon an dachenn c'hleb-se, ec'hon, karzennet gant kanolioù, poblet gant kerc'heized eo bet staliet ar mirlec'hioù eoul-maen kentañ e dibenn ar Brezel Bed kentañ. Savet e oa bet adkaeoù evit gallet degemer al listri karget a eoul-maen, evit ma vefe disammet un tamm prozh Sant-Nazer erru peuzleun. E 1932, e kalon un enkadenn labour-douar eo e oa bet lakaet da vont en-dro an unvez purañ eoul-maen kentañ. Meur a beizant o doa ranket paouez da labourat o douar a oa erruet da lakaat e gwerzh o nerzh-labour.

Met ne oa ket a-walc'h a lojeiz evit degemer kement a labourerien « *savet e voe neuze kêrioù micherourien e-tal an uzinoù hag ar bourk* », evel ma kont Christelle ha Fabrice Tripon en o levr gouestlet da istor ar gumun. E 1944 e oa bet distrujet 80 % eus ar bourk, hag adsavet neuze un nebeut bloavezhioù war-lerc'h, 1 kilometr pelloc'h e-dia-barzh an douaroù.

Gant sikour emgar a-walc'h renerien al lec'hienn industriel. Displegañ 'ra Christelle ha Fabrice Tripon penaos e oa bet prestet ur saverez parpagnou d'ur strollad tud eus Donez, dezho da sevel o ziez « *Castor* »<sup>4</sup>, ur pennad hent diouzh ar bourk kozh. « *Spletus e oa bet evit ar purerezhioù [tier outo d'ar c'houlz-se NGAS] dilec'hiañ ar bourk, evel-se o doa bet gallet en em ledañ a-hed ar stêr Liger adalek ar bloavezhioù 1950* », evel ma lâre deomp ar skridaozerien. Ur splet n'eo ket bet lezet a-gostez gant Purerezhioù Frañs Eoul-maen an Atlantele (deuet da vout Antar, Elf ha Total.

« *N'eus ken met div gêr o doa ranket dilec'hiañ abalamour d'ar brezel* », eme François Cheneau da echuiñ. Donez hag Oradour-sur-Glane, ar gêr eus Haute-Vienne bet brudet abalamour d'he foblañs bet lazhet gant an arme alaman d'an 10 a viz Even 1944.

## **NOAZADURIOÙ HEP ADC'HOUNIDOÙ EKONOMIKEL**

« *Deuet eo Donez da vout ur gêr d'an dud da gousket eno nemetken, ur gêr divuhez* », hervez Florence, bet kejet ganti d'an 23 a viz Mae ar bloaz-mañ, war ar marc'had war blasenn Armand Morvan, diwar anv an hini bet maer er gumun etre 1945 ha 1959, pa oa ivez eil-rener ar burerezh. Hiriv an deiz e kaver e-tal ar gêr ul lec'hienn Seveso « *live uhel* »<sup>5</sup> a ya war fallaat, pezh a grog da ankeniañ

4] « Ils construisaient leurs maisons tous ensemble puis les tiraient au sort : l'histoire des Castors », Lise Hör, Colibri le Mag, 28 a viz Genver 2020

5] Fichenn « Installations classées ou autres sites inspectés TotalEnergies Raffinage France », lec'hienn internet Georisques, bet gweladennet e miz Genver 2025

Florence, klañvdiourez e ti an dud, p'emañ he zri bugel ganti er gêr.

E 2021 ha 2022, e oa bet tri gwallzarvoud grevus en eil purerezh Frañs memes tra, pezh en doa roet tro da loc'hañ seul daol un enklask gant servijoù ministrerezh an treuzkemm ekologel : un deveradenn eoul-maen war ur san<sup>6</sup>, sac'het an tredan<sup>7</sup> hag un deveradenn diouzh ur penton strilheoul<sup>8</sup>.

Pa ya an heol da guzh d'an 21 a viz Kerzu 2022 e oa bet aloubet ar bourk gant ur flaer strilheoul kreñv. Dre ma ne oa bet kaset tamm keloù ebet d'an annezidi diwar-benn an deveradenn strilheoul dañjerus a-walc'h o paouez en em gavout en unan eus pentonioù ar burerezh un 800 metr pelloc'h, e oa lod eus an annezidi o klask un displegadenn bennak en ur furchal e keflusker o c'harr.

Diboell a-walc'h pezh a c'hoarvezas neuze, hervez pezh a zo bet kontet deomp gant un apotiker yaouank a oa diouzh tro an nozvezh-se, Benjamin Bégo. Rak gouzout mat e oar n'eo ket sin mat seurt flaer : « *anat eo e vefe bet gwelloc'h d'an dud chom ba'r gêr, ha ne oa*

*ket ar c'houlz da vont er-maez !* ». Hervez muzulioù Aer Broioù al Liger<sup>9</sup>, ar gevredigezh e-karget da ziwall kalite an aer er rannvro-se, e oa bet diskoachet da neuze kementadoù uhel benzen<sup>10</sup>, a zo ur c'hompozad kankreiat.

War a seblant ez eo torret al liamm a veze etre annezidi Donez ha Total. « *Goude ar brezel e oa un emglev : gant ar burerezh e veze degaset implijoù ha savadoù diwar an tailhoù. En eskemm e veze saotradurioù ha nozadurioù all. Evel-just ez eus kalz a nebeutoc'h a saotradurioù hiriv an deiz eget na oa da neuze, met aet eo da get ar gounidoù a veze degaset gant ar burerezh* », hervez François Cheneau, dipit en e vouezh.

Hag abaoe m'eo bet savet ar c'humuniezhoù kumunioù e 2001 e vez dasparzhet ar savadoù diwar an tailhoù etre hollad kumunioù Sant-Nazer. Echu gant kêr Donez o pakañ gounidoù an eoul-maen eviti hepken. « *Betek ar c'hleub melldroad n'eo ket arc'hantaouet ken gant Total !* », eme ar maer, feuket. Abaoe m'eo bet harzhet ar produiñ (ouzhpenn 15 miz) da vare an enkadenn yec'hedel, ez eus bet kalz nebeutoc'h a

## « An dud a rankfe chom er ger. »

6] Danevell enklask diwar-benn un tec'hadenn tireoul kriz war ur c'hanoliererezh a gas ar purerezh TotalEnergies eus Donges (44) bet kavet d'an 2 a viz, burev enklask ha dielfennañ ar riskloù greantel, 7 a viz Here 2021

7] Danevell enklask diwar-benn an torradur produiñ tredan a oa bet e-barzh ar purerezh TotalEnergies Raffinage France e Donges (44) d'an 8 a viz Meurzh 2022, burev enklask ha dielfennañ ar riskloù greantel, 27 a viz Gwengolo 2022

8] Danevell enklask diwar-benn tec'hadenn ar produioù e-barzh al lec'hienn industriel TotalEnergies Raffinage France e Donges (44) d'an 21 a viz Kerzu 2022, burev enklask ha dielfennañ ar riskloù greantel, 6 a viz Kerzu 2023

9] « *Qualité de l'air liée à l'incident de la raffinerie de Donges, rapport n°1 des mesures effectuées par canisters* », Aer Broioù al Liger, 9 a viz Genver 2023

10] « *Benzene* », *Evaluation of Carcinogenic Risks to Humans*, volume 120, IARC monographies, 2018

# « Gant ar burerezh e veze degaset implijoù ha savadoù diwar an tailhoù. »

bellgomzadennoù da TotalEnergies<sup>11</sup> digant tud ar c'harter lakaet diaes gant trouzioù pe flauer (18 gwech e 2023 pa oa bet 106 e 2019, hervez an embregerezh). Padal e chom ankeniet an dud gant stad ar greizenn eoul-gimiezh erru kozh-mat. E prefeti al Liger-Atlantel da skouer.

D'an 20 a viz C'hwevrer 2024<sup>12</sup> ez eus bet kaset redi d'an embregerezh abalamour ma n'he doa ket doujet ouzh ar reolennoù surentez, ha ranket en deus chom a-sav sizhunvezhioù-pad : re alies e vez e sanioù o teverañ, ha n'heller ket fiziñ ken en e reizhioù alarmin.

Met evit Remy Klein, 80 bloaz hiriv an

deiz, bet sternier er burerezh, n'eo ket torret evit kement-se e fiziñs en e implijer kozh. Poan en deus klevet e vefe lakaet douetañs war fiziusted an embregerezh : « *Lod a glask lakaat bec'h war ar burerezh ! C'hoarvez 'ra vefe gwallzarvoudoù, un tamm 'vel war ur c'harr !* », a gendalc'h, birvilh ennañ. « *Hiriv an deiz vez embannet pep tra e pep lec'h, lakaet pep darvoud war-wel, ha tamallet an embregerezh. A-benn nebeut ne vo ket moaien ken staotat tro-kein an ti hep bezañ lakaet da saotrer* », emezañ kounnaret, en ur reiñ ur fustad d'« *an normoù o deus lazhet hon industriezh* ».

Arouezius eo Rémy Klein diouzh ul lodenn eus an dud – war o leve

evit an darn vras anezho – ha ne fell ket dezho tamall TotalEnergies. Warbouez pa veneger ar glad istorel lec'hel bet gwallgaset gant ar gompagnunezh liesvroadel, evel evit pezh a sell ouzh kastell kaer Marzhinieg (Martigné) eus an XIXvet kantved, hag a oa bet diskaet a-daolioù palerezioù e 2014<sup>13</sup>.

Hiriv an deiz e vez tro 630 den a vez o labourat evit TotalEnergies e Donez, hep kontañ kantadoù a eil-kevratourien. Pell a-walc'h neuze eus 3.000 maouez pe gwaz a veze implijet e ti Antar e penn-kentañ ar bloavezhioù 1960<sup>14</sup>. N'eus liamm ebet ken bremañ etre darn vras an 8.000 annezad er

11] « Suivi des signalements », lec'hienn internet TotalEnergies, bet gweladennet e miz Genver 2025

12] Diferad-prefed 2024/ICPE/058 diwar-benn an annez, Staliadurioù rummet evit gwareziñ an endro, kevredad TotalEnergies Raffinage France commun de Donges, staliadur puraat ha stokañ produioù tireoul, prefeti al Liger-Atlantel, 20 a viz C'hwevrer 2024

13] « Il ne reste plus rien du château de Martigné », *Ouest-France*, 10 a viz Gouere 2014

14] « Raffinerie de Donges : 100 ans d'histoire », *Ouest-France*, 8 a viz Here 2017

# PENAO S HE DEUS KRESKET AR BUREREZH




▲ 1960

*Emañ ar burerezh dreist-holl e su an hent-houarn. Er rond ruz e c'haller gwelet kêriadenn Les Maraudois e-lec'h ma oa ar c'houplad Guihard o chom.*



◀ 1971

*Krog a ra da vont war vrasaat ar burerezh, e norzh an hent-houarn.*



▲ 1975

*Savet eo bet ar poullou eoul e reter kanol Martigné.*



▲ 1985

*Savet eo bet an hent D100 e norzh ar burerezh. Krog int embregerezhioù all d'en em staliañ e-tre an uzin ha karter Bonne-Nouvelle.*

# A-HED AR BLOAVEZHIOÙ



◀ 2004  
Beuzet er burerezh eo  
kêriadenn Les Maraudais.



◀ 2013  
Chom a ra un ti hepken  
er gêriadenn : hini ar  
c'houplad Guihard.

2022 ▶  
An hent-houarn a zo  
bet diblaset e norzh  
ar burerezh. Diblaset  
eo bet ivez an D100  
ha tremen a ra dre Les  
Maraudais. Ti Thérèse  
hag he gwaz a zo bet  
distrujet.



gumun hag ar burerezh. Micherourien eus outo dreist-holl (dindan 3 % a sternerien), ha tud yaouank-tre : 40 % outo dindan 30 vloaz<sup>15</sup>.

« *E-touez ar re zo bet oc'h en em staliañ, kalzik outo a labour e ti Airbus, er Chanterioù pe evit o eil-kevratourien. Pezh a fell d'ar re yaouank kaout eo un ti dezho, un dachenn da sevel ti. Evit-se eo e teuont amañ* », a ouzhpenn an aotrou maer. Ha dre m'emañ tost ouzh ar burerezh ha pell a-walc'h diouzh ar mor (etre 15 ha 20 km), ez eo izeloc'h-mat (eus 39 %) keidenn priz un ti e Donez<sup>16</sup> eget priz unan e Sant-Nazer.

Frealzet eo tud zo en ur soñjal n'emañ ket o zi dindan an avelioù pennañ, ha pell a-walc'h diouzh flaer an tireoul neuze.

Gwir eo da skouer evit Sabrina, junterez e ti Airbus Atlantic, e Sant-Nazer, deuet un 20 vloaz zo bennek d'en em staliañ en Ecottais, ur c'harter diavaez eus Donez. Tri bugel zo ganti er gêr, hag anzav a ra n'eo ket dedennet gant pezh a c'hoarvez er burerezh. « *Gouzout a reomp emamp en ur vro lec'h ma kaver un toullad mat a lec'hiennoù industriel, hag alese un nebeut riskloù. Pezh a c'houlennomp eo ma vefe ur surentez a-zoare.* »

Pell zo emañ sternerien ar burerezh, diouzh o zu, o chom war vord ar mor, en Naoned, pe war ar maez don.

Un hanter-kant bennak a annezidi ha tud ar gevredigezh Aer Broioù al Liger a oa deuet d'an emvod kelaouiñ bet aozet gant an AEDZRP d'an 21 a viz Ebrel 2023, pevar miz war-lerc'h ma vefe bet deveret eoul-maen diwar ur penton. Gant ar gevredigezh e oa bet roet d'an dud sifroù uhel ar saotradur bet muzuliet war-lerc'h a darvoud. Mantret e oa meur a hini e-touez an dud bodet e sal lies-implij an ti-kêr.

« *Petra zo kaoz n'eo ket bet kelaouet an dud ?* », eme un annezad heuet. « *Ma vefe bet lâret din e vefen chomet bac'het ha n'em befe ket laosket ma bugale e Donez* », a ouzhpenn ur vamm yaouank. « *Pa soñjan e oamp e vakañsoù gant hor bugale, memes tra !* », a huhe unan all. Hag evit echuiñ : « *Ret eo bet*

*deomp stankañ an toulloù aveliñ zo war an ti. Poan-benn a oa gant tud zo. Fuloret on da vat !* »

Bloaz war-lerc'h e oa bet lidet er bure-rezh kant vloaz an embregerezh Total (pe gentoc'h hini Kompagnunezh Frañs an Tireoul, deuet Total diwarni). Rémy Klein a oa bet sterner en embregerezh, n'helle ket c'hwitañ an abadenn : « *Un darvoud a-zoare, en tu all da 800 den bodet* », emezañ gant entan. E 2017 dija e oa bet lidet gant ar gelaouenn Ouest-France kant vloaz donedigezh an eoul-maen war vord al Liger, en ur embann ur

### « 10 % eus implijidi zo o chom e Donez hiziv. E 1950 e oa eus an hanter. »

15] Kumun Donez (44052), diell war lec'hienn internet an Insee, bet gweladennet e miz Genver 2025

16] « Prix m2 immobilier à Donges en décembre 2024 (44480) », Ouest-France, bet gweladennet e miz Genver 2025





*An dachenn c'hoari mellroad a zo tost-tre d'ar burerezh. En dañjer eo bet lakaet yec'hed annezidi ar c'harter dre ar saotradurioù zo bet e 2022.*

c'haierig 16 pajennad<sup>17</sup>, hag a oa bruderezh evit ar strollad Total war ar bajenn ziwezhañ.

Er c'hontrol diouzh pezh a weler evit lec'hioù purerezhioù all evel Fos-sur-Mer, ne glever ket istorioù all estreget an istor ofisiel, a zispleg deomp Renaud Bécot, ken-aozer al levr « *Bevañ ha stourm en ur bed pistrius. Feulster ouzh an endro hag ouzh ar yec'hed da vare an eoul-maen. (Vivre et lutter dans un monde toxique. Violence environnementale et santé à l'âge du pétrole, 2023)* ».

« *Pezh a gavan souezhus el lodenn-mañ eus aber al Liger ez eo penaos ez eo bac'het*

*ar speredoù pa gomzer eus an danvezioù a gas energiezh, eoul-maen, glaou (kreizenn Kordevez - Cordemais), ar raktresoù kreizennoù nukleel aet d'ar c'hleuz (Pentelloù-Le Pellerin, ar Garned - le Carnet)... Bepred gant ar soñj e vefe bet degemeret seurt obererezhioù el lodenn-mañ eus an aber. »*

Ne vez bepred kaset seurt raktresoù hep na savfe enebiezh outo koulskoude, amañ pe lec'h all, « *hep na vefe mouezhioù ur bihan-niver o sevel en-dro da vare gwallzarvoudoù en industriezh* ».

**Samy Archimède**

17] « Raffinerie de Donges : 100 ans d'histoire », *Ouest-France*, 8 a viz Here 2017



**Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !**  
Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant *Splann!* ? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war [www.splann.org](http://www.splann.org)

## **Klevet 'peus kaoz eus Splann ! ?**

*Splann !* a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann !* d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud. Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann !* a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann !*

## **Ur media dizalc'h...**

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann !* Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann !* 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann !* 'neus ket na perc'henner pinvidik na bruderezh na kevrannegerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann !*

## **... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer**

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidig e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann !* Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Gwriziet mat eo *Splann !* E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

## Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur  
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

## Ur stumm kevredigezhel

*Splann !* 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a endro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann !*, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh. Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennerien a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennerien 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar pennadoù. Kazetennerien a-vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant kazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann.

Ober war-dro mont-endro *Splann !* a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed pouezh ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

## Lennit hon enklaskoù diwezhañ war [splann.org](http://splann.org)

- *Breizh : c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- *Iberdrola. Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- *Metan : Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- *Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- *Moc'h fall*, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- *Brezel ar parkeier*, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- *Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- *Keuzioù ha girzhier en arvar*, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024
- *Klañv eo porzh Sant-Nazer gant e industriezhioù*, Samy Archimède, Itzel Marie Diaz, Gwengolo 2024
- *Mengleuzioù pistrius e Breizh*, Célia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall, miz Du 2024
- *Temptadur ar betoñs en arvor*, Jérémie Szpirglas, Denis Vannier, Genver 2025

# Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h Splann ! Evit poent eo bet arc'hantaouet hag embannet pevar enklask a-drugarez d'ho tonezonoù.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war [www.splann.org](http://www.splann.org) pe dre chekenn :

« Da *Splann !* » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann !*,

3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

## Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù ki-zidig pe danvezioù e rankfe Splann ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

## Mont en darempred

[contact@splann.org](mailto:contact@splann.org)

*Splann !*, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

### *Splann !*

Ti ar Vro  
3, plasenn Maez ar Roue  
22 200 Gwengamp

### Penn renner an embann

Alain Goutal

### Kazetennerien

Samy Archimède, Itzel  
Marie Diaz

### Skeudennoù

Samy Archimède,  
Benjamin Peyrel,  
Anthony Torzec, Florent  
Pommier, Nicolas Guillon,  
Lilian Gallet

### Bet heuliet gant

Juliette Cabaço-Roger,  
Julie Lallouët-Geffroy,  
Inès Léraud

### Laket brav gant

Anne Caillet-Leroy

### Difazhiet gant

Juliette Cabaço-Roger,  
Julie Lallouët-Geffroy

### Troidigezh

Sten Charbonneau

### Adlennet gant alvokadez

Claire Simonneau

Imprimeur Cloître  
ZA Croas-ar-Nezic  
29 800 Saint-Thonan  
Menegou lezenn :  
1e trimestre 2025  
ISSN: 2800-664X  
Bet embannet e miz  
Gwengolo 2024  
Levrig n°7

